

# IMBOURC'H

N i v e r e n n 40

31 M a e 1973

I M B O U R C ' H , K E L A O U E N N B O L I T I K E L

Pevare bloavezh

Niverenn 40

31 Mae 1973

Darvoudoù an nevez-amzer ha folklorikadur an **Emsav**  
gant H.K. ....p.107  
Dilennadegoù ar 4 a viz Meurzh : Disoc'hoù an danvez-  
kannaded rannvroelour .....p.115  
Dilennadegoù ar kannaded e Breizh, studienn gant  
Yann Morvan .....p.117  
Un nebeut titouroù diwar-benn armerzh Breizh.....p.125  
Keleier liesseurt.....p.132  
"Me 'm eus c'hoant un toull" (YOD-KERC'H) .....p.141

---

Koumanant-bloaz : 30 lur (gant ar geriadur armerzhel). K.R.P. Y. Ollivier  
1 534 25 Eoazhon. Deraouiñ a ra ar c'houmanant e miz Genver. Priz an  
niverenn-mañ : 4 lur.

Ar pennadoù a zo da gas da : Y. Ollivier : 7 bd. A.-Burloud,  
35 000 - Roazhon.

• CPPP : 50 015

---

D A R V O U D O U A N N E V E Z - A M Z E R

H A F O L K L O R E K A D U R A N E M S A V

==...==

Ar bloavezhioù, eme ar furnez, a zeu an eil war-lerc'h egile hep bezañ heñvel an eil ouzh egile. Ar c'hrennlavar-mañ a c'heller gwiriañ ur wech ouzhpenn e ser ar bloavezh-mañ ha na seblant ket tennañ kalz evit ar poent d'ar bloavezh tremenet. Merket e oa bet ar bloavezh tremenet-se gant ar pezh a zo bet anvet an trede "F.L.B." hag ar prosezou hep barnedigezh c'hrevus ebet renet etre miz Mae ha miz Here. E ser ar prosezioù-se e oa bet diorreet e-pad seizh pe eizh miz un obererezh politikel liesseurt kaset da benn e framm kengorioù berrbad a raed anezho "kengorioù-harpañ" o deus aozet diskeladegoù niverus, dibunadegoù pe ouelioù poblek a bep doare. E Breizh penn-da-benn a-hend-all e oa bet broudet ar spered brogar gant ec'hwel ar "Joint Français" ha dilezioù-labour all. An holl zarvoudoù-se o deus roet tro da vroudañ stourmerion vrezhon zo, dreist-holl e metou ar studierion e Roazhon. Diskouezet hor boa avat pegen amsteriek e chome an holl obererezh politikel-se, ken a-berzh ar re a gemere perzh war-eeun en darvoudoù, ken a-berzh ar re a glaske tennañ o mad diouto evit kas war-raok ur bruderezh brezhon ha kleizelour war un dro. Ha, dres, menel a rae an obererezh-se forc'hellek a-grenn dre ma ne oa ket renet gant un aozadur padus, start hag atebek, - gant kengorioù berrbad, dizunvan, digenurzh ha diatebek, tonket dezho bezañ dispennet abarzh pell, ne lavaran ket. Pezh a oa aes da rakwelout - steuziadur al luskad brezhon-kleizelour eus warlene - a zo c'hoarvezet : n'eus manet netra a-ziwar-lerc'h ar c'hengorioù o deus arc'hwelet war an dachenn foran e 1972.

Echu eo eta touellwel ar F.L.B. evit ar mare. Hag e ser kement-se e lavarin ez eo kasaus meurbet e ve implijet lavarennoù zo evit doareañ devoudoù politikel ha n'o deus netra da welout gant ar ster a roer peurvuiañ d'ar gerioù. En degouezh-mañ end-eeun e kejomp gant an anadenn a c'hellfed en'vel "folklorekadur an Emsav", ur wech klevet ez intentomp gant ar ger "folklorekadur" un argerzhad koll ster a laka un obererezh bennak a zleje enouestlañ buhez un den penn-da-benn da dreiñ d'un doare c'hoari pe diduellerezh, un deverr-amzer, ha kement-se hep gouzout

kaer d'ar re a zo emellet en obererezh c'hoariel-se a-wechoù.

C'hoarvezet eo gant an "T.D.B." ar pezh a zo c'hoarvezet gant afer ar "BZH" un nebeut bloavezhioù zo: goude bezañ bet sellet evel un arouez dispac'hel ez eo deuet ar "BZH" da vezañ ur varchadourezh folklorik-touristek a vez kavet zoken e diadrefñ kirri-tan Alamaned oc'h ergerzhout ar vro e-pad an hañv. Heñvel, goude bezañ embannet e oa o vont da zieubiñ BREIZH ez eo aet an "T.D.B." d'ur gronnad nagennerion ha n'en deus ken mennad nemet dedennañ evezh ar "gouarnamant" war enkadenn ar vro, anv ebet ken gantañ a zieubiñ Breizh. Gwall azonus eo ar "c'holl ster"-se peogwir e laka anat ne glot ket mennadoù ar vrogarourion gant re urboblañs ha n'eo ket bet e darempred da vat gant an Emsav betek henn. Kontañ a reer moarvat ez eus ur "F.L.B." gwirion. Diaes eo avat krediñ kement-se p'en deus ranket al "Lu Republikan Brezhon" - ha na zever ket diouzh an Emsav diouzh maz eus un Emsav er mare-mañ - desammañ mui pe vui un obererezh ha na oa reolet gantañ e nep doare.

Gwan eo an Emsav eta, ha n'eo ket hepken e devoud, e-keñver niver e izili hag e nerzh gwirion, hogen ivez e-keñver kealiadurezh. An dezrannadurioù renet gant UDB, SAV, PCB h.a. ne hañvalont ket klotañ gant ar gwirvoud brezhon, pe, da vihanañ ne roont digor ebet d'un obererezh emsavel gwerc'hel.

Taolet o deus an dilennadegoù diwezhañ sklerijenn war an diouer-se eus al luskadoù brezhon er mare-mañ. Nag an U.D.B. na S.A.V. n'o deus graet berzh enno evel m'o doa goanaget. Kiriek eo da gement-se, diouzh un tu, moarvat, reutder ha strizhder an U.D.B. a c'hoari kalz muioc'h roll ur strollig rannvroelour eus an tu-kleiz eget hini ur strollad broadel sokialour e Breizh ; emichañs e oa ken yen feiz vrezhon ar re o deus mouezhiet a-du gant an U.D.B. hag hini emstriverion ar Strollad o unan. Maz eo ken gwan all feiz vrezhon an aozadur-mañ, penaos souezhiñ ma kav gwell ar gleizidi vreizhat sevel war-eeun a-du gant ar mennad pouezusañ a zo, da soñj an U.D.B. hec'h unan, trec'h ar sokialouriezh e Frañs, a vezo diogelet kalz suroc'h er vro-se gant ar P.C.F. eget gant un U.D.B. dister ha dic'halloud.

Daoust ma n'en deus ket ar strollad S.A.V. soublet e gein dirak strollad gall ebet n'en deus ket gouezet evit keloù se ren ur politikerezh brezhon spis ; embann a ra ez eus anezhañ ur strollad broadelour hogen ne rakwel evit Breizh nemet un emvelestrerezh gwall goumoulek ; kevreadelour ha kentoc'h mirelour ez eo evit ar poent ; ne ra dave da gelennadurezh resis ebet ha dre se ez eo diaes dezhañ dedennañ stourmerion ha mouezhierion. Niver ar voterion a-du gantañ en deus tapet e kelc'hparzhioù zo n'eo ket didalvez evelkent ; prouañ a ra an niver-se ez eus c'hoazh

un tammig emskiant vroadel e Breizh goude pemp kant vloaz a sujedigezh. Hag e ser kement-se e c'heller ober un evezhiadenn bouezus ; n'eo ket stag an emskiant vroadel e Breizh ouzh ar yezh, pe, da nebeutañ, ouzh ar parlantoù brezhonek a vez komzet c'hoazh e kornog ar vro. War an harzoù, er reter, ez eo bet tizhet an dregantadoù uhelañ a vouezhiadoù a-du gant ar mennoz breizhek. Moarvat ez eus tu da ziskleriañ ar berzh-se gant brud-vat an danvez-kannaded brogar er c'hornioù-bro-se. Hogen <sup>goude</sup> ma vefe un tamm gwirionez en diskleriadur-mañ e ranker anzav ne c'hoari ket an teodyezhoù brezhonek ur roll arbennik e diwanadur un emskiant bobl e Breizh er mare-mañ. Ar brezhoneg kelennet evel yezh vroadel a c'hell hepken diorren an emskiant-se. An dra-se a zo bet lavaret alies hogen an dilennadegoù diwezhañ a ro ur brouenn eus pezh a zo bet asuret a-gent meur a wech.

A-hend-all, petra e teuy da vezañ ur Strollad evel S.A.V. ? Daoust ha gouest e vo an emstriverion o deus kejet e ser an dilennadegoù diwezhañ da chom a-gevret evit krouiñ ur strollad gwirion ? An emdroadur-mañ ned eo ket gwirheñvel tamm ebet, avat. N'eus na rener na stroll renerion ebet e penn S.A.V. An hini en deus kemeret armuiañ perzh en aozidigezh ar stourmadenn e deroù ar bloaz ne denn e levezon nemet diouzh ar c'hevalaoù perc'hennet gantañ ; n'eo ket bet lodek e labour an Emsav betek henn ; ne oar ket ar yezh pe n'en deus ket studiet anezhi ; n'en deus embannet e soñj ebarzh kelaouenn bolitikel ebet. Kemendall a c'heller lavarout diwar-benn an danvez-kannaded o deus e harpet e-kerzh an dilennadegoù diwezhañ ; oberiant eo bet darn anezho er M.O.B. a-gentaou ; hiniennoù o deus labouret un tamm bennak e rez al ledemsav hogen n'o deus bet biskoazh darempred war-eeun gant an Emsav. Ouzhpennañ a c'heller ne oa ket unvan penn-da-benn diazezoù politikel an holl emstriverion, pell edo zoken. War ar marc'had o deus ar re yaouank eus ar gostezenn dehoù - bodet ebarzh "Breizh Yaouank" - mouzhet mui pe vui ouzh ar Strollad nevez ha gwell eo bet ganto sevel un aozadur diforc'h evito o unan ; S.A.V. eta, evel meur a strollad breizhek all, n'eo ket deuet a-benn da drec'hiñ skoilh ar rummadoù diforc'h. E seurt degouezh avat ez eo gwall start urzhiañ ur strollad gwirion. Lavaromp en tu-hont da se n'eus ere kefridiel ebet etre ar gelaouenn an "Avenir" hag an danvez strollad-mañ (a-hend-all, adarre, penaos e c'hellfe ur strollad embann ur gelaouenn hep en em skorañ war diazezoù diogel hag unvan ?) Dre se e c'heller soñjal n'eus dazont emsavel ebet d'an danvez aozadur-mañ ha ned ay ket e obererezh kalz en tu-hont d'ar stourmadenn he deus brudet anezhañ.

Ur wech ouzhpenn eta e c'hellomp stadañ pegen tenn eo krouiñ ha derc'hel en e sav un aozadur e Breizh. Na S.B.

nag ar P.C.B. n'o deus gellet padout pell ; kenderc'hel a ra an U.D.B. hogen ne ra ket berzh da vat evit an abegoù hon eus meneget uheloc'h, en abeg d'ur politikerezh bet divizet en ur saviad politikel arbennik meurbet ha distremenet a-benn bremañ (e 1964, dek vloaz bennak a zo, ez eo bet diazezet an U.D.B., da goulz dibenn Aljeria). Abaoe 1970 en deus klasket ar strollad-mañ enebañ ouzh al luskadoù kleizelour hogen an eneberezh-se n'en deus ket e zegaset da zontañ e ziazezoù broadel - anat eo koulskoude ez eo ar mennad broadel an hini pouezusañ er stourm a ren an Emsav e Breizh - , d'en em stagañ strishoc'h c'hoazh ouzh ouzh ar gostezenn glasel c'hall, ne lavaran ket. Ret eo lavarout n'eo ket gouest ar strolloù kleizelour dre vras da zezrannañ gwir saviad Breizh kennebeut all, nag hini ar gevredigezh europat dre vras. An divarregezh-se da welout an traoù o laka da vegañ ur romantelouriezh dañjerus dre ma n'eus danvez ebet d'ar mennadoù anezhi. Prest eo ar strolloù-se da grediñ e c'heller seveniñ emberr dispac'hoù a seurt gant ar re a zo bet kaset da benn en 19vet kantved hag e deroù an ugentvet en Europa pa n'eus mui keñver ebet etre kevredigezh kornogat ar prantad-se hag hini dibenn an ugentvet kantved. Ret eo lavarout e vez difennet an tezennoù dispac'helour gant studierion yaouank tre peurlvuiañ, da lavarout eo tud ha n'o deus ket kavet o lec'h c'hoazh er gevredigezh ha n'o deus atebeged ebet enni : alese an hollnagennelouriezh-se a dizh an holl renadoù diazezet, zoken ar re emanvet sokialour en URSS, e broioù reter Europa ha zoken Sina a-wechoù (kv. savboent ar "mouvement situationniste" e Bro-C'hall a venn leuriadiñ ar varksouriezh rik hag a ra eus "stourmelouriezh" ar strolloù kleizelour o unan un arallekadur). Ar romantelouriezh-se en em ziskouez ivez er pouez a ro al luskadoù kleizelour-se da anadennoù buhezel-politikel a seurt gant an "M.L.F." ("Emsav Dieubiñ ar Merc'hed") ; dave a reomp amañ da dezennoù "broadelour-kleizelour" ar stourmerion okitanat a skriv ebarzh ar gelaouenn "Lo lugar", da skouer, a fell dezho difenn an holl "vihanniveroù", revel h.a., didamall ar forc'hañ bugale h.a. Setu, diaes eo a-dreuz ar birvilh a gresk endro da geal ar "vroadelouriezh" pe, kentoc'h ar "genelelouriezh" en em led er mare-mañ en Okitania, da skouer, diverzout peseurt tuadurioù speredel-prederouriezhel a anado a-benn ar fin. Diogeliñ a c'hellfe unan oc'h arvestiñ ouzh droukvesk ar mennozioù e luskadoù ar "genelelourion-kleizelourion" er vro-se dreist-holl emañ ar stourmerion anezho o reuziañ ouzh un argerzhad distuziekaat kentoc'h eget <sup>o kas war-raok</sup> unan stuziekaat ; ar stourmerion a embann ez int kleizelourion n'o deus lennet peurlvuiañ nemet addisplegoù skort da oberennoù ar brederourion gleizour pennañ. En em lec'hiañ en tu-kleiz evit ar stourmerion-se a lavar hepken diskleriañ emeur a-du gant an "dispac'h" pe

kentoc'h ar "brezel dispac'hel" a-enep d'ar "vourc'hizion" sellet evel enkorfadurioù an Droug, un tammig evel ar yuzevion ergentaou ; hep gouzout dezho en em genstumm ar stourmerion-se meur a wech ouzh patromoù gouennelour o klask en em ziforc'hañ diouzh ar re zrouk en o stumm korf (blev, barv h.a.) pe en o gwiskamant.

Daoust d'o youl avat ne dizh ket al luskadoù kleizelour gwriziennañ en istor ha darvoudoù ar miz tremenet e "Frañs", an ec'hwelioù e Breizh hag e Bro-C'hall - a ro ur skouer splann eus an dic'halloud-se. Hini ebet eus ar stolloù o deus renet ar c'hoari e 1968, hini ebet eus o renerion - na Geissmar, na Cohn-Bendit h.a. ankounac'haet krenn hiziv - n'o deus bet perzh e darvoudoù ar miz tremenet; moarvat e tiskouez an darvoudoù-se e tistaol ar re yaouank talvoudoù ar gevredigezh "vourc'hiz" ; hogen disteurel talvoudoù zo ne lavar ket ez eur prest na gouest da ginnig talvoudoù nevez rak amañ adarre e ra an droukveskerezh e reuz e tezennoù an dispac'helourion a ziskouez kaout un emzalc'h nac'hus hepken.

Ne lavaran ket ez eo bet un dra fall an diskeladegoù a zo bet kaset da benn e Breizh hag e Bro-C'hall en nevez amzer-mañ; ar sevenadur a zo o ren bremañ a rank bezañ distrujet n'eus forzh penaos hag unan all a rank bezañ erlec'hiet outañ. Hogen dres, daoust ha gouest eo ar re a ren seurt diskeladegoù da gaout ur meizadur sklaer eus ar sevenadur nevez a fellfe dezho krouiñ ? Ne gav ket deomp. C'hoarvezout a ra gant luskadoù ar studierion ar pezh a c'hoarvez gant an Emsav-ledemsav ; gant ar re-se ivez e teu an obererezh politikel da vezañ danvez folklorrek. Bez ez eo ar "manif" darn eus folklor ar studierion. Amañ e keomp adarre gant ar "c'holl ster" hon eus evezhiet outañ e ser anadennoù ledemsavel hor bro (BZH, "Talbenn Dieubiñ Breizh"). Diwanañ a ra ar c'holl-ster-se diouzh an diouer a framm hag a stourmerion kendrec'het da vat e metou ar studierion, da skouer. E devoud ned a ket obererezh politikel ar re-mañ en tu-hont da brantad ar studioù o unan. Ur wech deuet tre e er vuhez vicherel ha dimezet e paouez ar studierion peurvuiañ gant ar stourm politikel ; ar re a gendalc'h da "ober politikerezh" a rank dont tre en un aozadur ha n'en deus ket darempredoù brientek hag arbennik gant ar studierion.

Peseurt kentel tennañ eus kement emañ o paouez displegañ ? Houmañ dreist-holl, a gav din : arabat eo reiñ re a bouez d'al labour a vez graet e metou ar studierion en abeg d'an arvez folklorrek a wisk o obererezh politikel peurvuiañ. Gouzout mat a ran ez eur deuet a-benn da lakaat bannieloù breizhat ha c'hrituloù a-du gant ar yezh e dibunadeg ar studierion e Roazhon e dibenn miz Meurzh. Hogen an dalc'h eo gouzout ha reiñ a rae paotred an diskeladeg ur pouez dreist d'an arc'hadurioù a-du gant ar yezh pe daoust ha ne oa ar

goulennoù-se adarre evito nemet un arvez a eilpouez eus an "nagennerezh" a renont a-enep d'ar "pennadurezhioù" dre vras. Anat eo ne dalv ket kalz ar boan ober anv eus ar yezh hag eus ar vroadelezh en ur c'hendegouezh a lam o ster diganto. An arbenn-se dreist-holl - kentoc'h eget an aon rak bezañ mesket en ul luskad ha n'en deus ket kalz dazont politikel - eo a zlefe mirout ouzh ar stourmerion vrezhon a gemer perzh en oberiadennoù politikel ha na roont ket d'o emgannar ster a roont o unan.

Diouzh ar sellboent-se eo e tleer barn an arnod da adsevel "kest ar brezhoneg" er bloaz-mañ. Daoust maz eo bet adsavet ar gest-se diwar intrudu ha dindan atebegzh ur "broadelour" ez eo bet graet dindan talbenn un aozadur ledemsavel rik a zo ar C.E.L.I.B. Dre se end-eeun - rak an holl a oar en em laka ar C.E.L.I.B. penn-da-benn e framm ar Stad hag ar sevenadur gall - e koll mennadoù ar stourm emsavel evit ar yezh o ster adarre. Moarvat e c'heller lavarout ez eo gwell ober brud endro d'ar brezhoneg en doare-se eget tamm ebet. Hogen plegañ da implijout hentenoù zo da ren ur stourm a dalvez ivez reiñ d'ar stourm-se bevennoù ha na c'heller ket mont en tu all dezho : kement-se a zo bet lavaret ha displeget kant gwech e ser stourm ar rannvroelourion endev.

Notomp erfin e c'hell argerzh ar folklorkaat tizhout an Emsav e unan en doare ar muiañ dic'hortoz, da lavarout eo e stumm ar feulster e unan. Merket hon eus an arvez folklorik eus ar feulster en trede T.D.B. hogen bez e c'hell an hevelep folklorkadur en em ziskouez en obererezh ar stourmerion a garfe degas e Breizh doareoù-stourm "Cymdeithas yr iaith" e Kembre. Tro hon eus bet dija da venegiñ dre zegouezh ar c'hevredad-mañ hep ober dezrannadur kevan ebet eus hec'h obererezh (an dra-se a oa dic'hallus o vezañ ma n'hor boa ket a-walc'h a ditouroù diwar-benn ar g"Cymdeithas..."). N'eus forzh penaos, diouzh ar pezh a ouzomp, e kav deomp evelkent ne glot ket gweladurioù ar stourmerion gembreat gant gwirvoud politikel o bro pe hon hini ; da skouer hor boa burutellet en un niverenn eus IMBOURC'H e 1971 ar gredenn e c'helle Emsav Kembre en em harpañ war ur bloc'h kembraeger bennak. Fazi e vefe eta ar stourmerion vrezhon a glaskfe trevezañ hep spered barn ebetstummoù oberiañ ar c'hevredad kembreat. Klevout a reer lavarout a-wechoù, lakaomp, e tlefed ren e Breizh ur stourmadenn a-benntbrezhonekaat ar pannelloù-hent hag an hentarouezierezh e Breizh, a seurt gant an hini a zo bet kaset da benn gant yaouankizoù ar "gCymdeithas..." e Kembre er bloavezhioù tremenet. War hor menoz avat ne vefe ket fur marmouzañ ar stourmerion gembreat diwar herr, hep gouzout ent resis zoken ar pezh o deus graet ar re-mañ.



Meur a graf a rankfed ensellout abarzh kemer un disentez bennak e-keñver ur seurt obererezh led-lezennel. An hini kentañ a dennfe d'en em c'houlenn ha dereout a ra al labour brudañ er-maez a lezenn ouzh un aozadur digor. War hor menoz adarre ez eo diaes d'an hevelep aozadur ren war un dro ur stourm digor hag unan all dirgel. Ne gredomp ket a-hend-all e talv ar boan ren ur politikerezh brezhonekaat ar mererezh (o reiñ stummoù brezhonek d'an anvioù-lec'h, da skouer) kent na vije ar pep brasañ eus ar boblañs a-du gant ar politikerezh-se. Ur politikerezh brezhonekaat n'en deus ur ster nemet adal ma klot gant un ezhomm eus ar boblañs. Hogen er mare-mañ e oar an darn-vuiañ eus ar Vrezhoned gwelloc'h galleg eget brezhoneg ha diboell eo goulenn brezhonekaat an amaezhierzh-stad a-raok ma vije skignet a-walc'h ar spered broadel war un dro gant anaoudegezh ar yezh vroadel e-touez ar bobl. Ma ne ziwaller ket emeur war var da ziaezañ ar boblañs o c'houlenn eviti pezh n'he deus ezhomm ebet anezhañ evit ar poent ; en diwezh emeur war var ivez da dreiñ an dud e Breizh a-enep da geal ar brezhonekaat e unan. An hentenn wellañ a zo eta gounit da gentañ ar pennadurezhioù lec'hel, lakaat ar c'huzulioù parrez da blantañ o unan pannelloù-hent e brezhoneg war dreuzoù pep bourc'h e Breizh (a-walc'h a banelloù touristek o deus plantet evel-se). N'eus forzh penaos ez eo arabat ober netra dre laer hep lakaat ar boblañs da gemer perzh en ur stumm bennak.

Erfin, un afer stadel eo stumm an anvioù-lec'h ha n'eo ket d'an hinienn divizout hec'h unan o skrivadur. War a hañval, brezhonekaat an anvioù-lec'h e kornog ar vro, da soñj stourmerion zo, a lavar hepken reiñ dezho ar stumm trefoet anezho egiz mazint distaget er c'horn-bro e-lec'h an hini kefridiel gall. Siwazh, stumm reizh an anv-lec'h a zo dres hini ar mererezh gall. Pezh a zo d'ober eta n'eo ket degemer ar stummoù trefoet ha digomprenus hogen modernaat hepken ar stummoù kefridiel a vremañ. Diboell e vefe, da skouer, hiziv an deiz, distreiñ d'ur stumm egiz "Placraneg" e-lec'h "Ploubazlanec"; an holl vrezhonegerion a zo gouest da gompren peseurt ster en deus an anv-lec'h "Plouvalaneg" ; ar stumm-se eo a zle bezañ degemeret, ur wech arnevezet ar stumm anezhañ. Heñvel : "Bannalec" a rank bezañ skrivet "Banaleg" ha n'eo ket "Banleg" ; "Locminé" "Lok-Menec'h" ha n'eo ket "Logunec'h" ; "Questembert" "Kestemberzh" ha n'eo ket "Kistreberzh" (e gwirionez e vez distaget "Kistrebiac'h" er c'horn-bro.) Ret eo eta d'ur c'hengor sturyezhañ eus an Emsav termeniñ da gentañ stummoù reizh an anvioù-lec'h e Breizh a-raok kregiñ gant nep stourmadenn vrezhonekaat e neb lec'h e Breizh. E Reter ar vro ez eus tu d'ober adal bremañ gant ar roll diazezet gant T. Jeusset ur wech graet ennañ un nebeut reizhadennoù. Hogen n'eus forzh penaos, a adlavaromp, ez eo didalvez kregiñ gant ur stourmadenn vrezhonekaat a-raok ma vije diorreet a-walc'h ar spered broadel hag an Emsav e unan e Breizh.

Moarvat e vez santet ar seurt obererezh war an dachenn evel un ezhomm gant darn eus ar stourmerion. Padal, degouezh an T.D.B. en deus diskouezet endev n'en deus ket ar feulster ur ster emsavel drezañ e unan. Ma chom ar feulster emdarzhek, anienel, dizurzhiat ha diframm, ma ne zever ket diouzh un dezrannadur eus ar saviad politikel renet gant un aozadur ne c'hell disoc'hañ da neb lec'h hag emañ war var da reuziañ buhez ar stourmerion hep degas netra d'an Emsav. En diwezh etane vefe ar feulster arouez-ennel-se nemet un arvez all eus folkloradur an Emsav.

H.K.

GERIOU DIAES

- Nagennerezh : contestation. Hollnagennelouriezh : contestationnisme généralisé.  
Stuziekaat : acculturation (verb, ivez : stuziekadur)  
Distuziekaat : déculturation.  
C'hoariel : ludique  
Led-lezennel : paralégal  
Arbenn : raison, motif.

DILENNADEGOU AR 4 A VIZ MEURZH 1973 : DISOC'HOU AN DANVEZ-KANNADED RANVROELOUR

Evit ar wech kentañ e Breizh e voe kinniget danvez-kannaded niverus gant al luskadoù brezhon : 5 gant an U. D.B. (Unvaniezh Demokratel Breizh) hag 26 gant S.A.V. (Strollad ar Vro). Dastumet o deus 36 228 mouezhiad, 6 062 gant an U.D.B. ha 30 166 gant S.A.V., da lavarout eo 2,69 % eus niver hollel ar mouezhiadoù e Breizh. Tri danvez-kannad o devoe dindan 500 mouezhiad, dek etre 500 ha 1 000, 8 etre 1 000 ha 1 500, eizh etre 1 500 ha 2 000 ha daou ouzhpenn 2 000 mouezhiad. Niver keitat ar mouezhiadoù dastumet gant danvez-kannaded an U.D.B. a voe 1 212 ha gant danvez-kannaded S.A.V. 1 160. Setu penaos e voe dasparzhet ar mouezhiadoù rannvroelour dre ar munud :

<u>AODOU-AN-HANTERNOZ</u>		Dregantad eus ar Niver a vouezhioù mouezhiadoù eztaolet	
1) Sant-Brieg	Gervais GAUTIER (SAV)	2 274	3,15 %
2) Dinan	Yann FOUERE (SAV)	1 365	2,56 %
3) Loudieg	Alain CHAPEL (SAV)	797	1,63 %
(e Loudieg en deus dastumet Guy CARO (PSU) 5 738 mouezhiad eleze 11,7 %)			

PENN-AR-BED

1) Kemper	Jean-Marie LE CALVEZ (SAV)	1 622	2,88 %
2) Brest	André TANGUY (SAV)	605	0,86 %
	René L'HOSTIS (UDB)	1 769	2,51 %
3) Landerne	Pierre CADALEN (SAV)	1 697	3,1 %
	Patrick DORVAL (UDB)	1 621	2,95 %
4) Montroulez	Jean NICOL (SAV)	611	1,28 %

IZOL-HA-GWINUN

1) Roazhon-Norz	Patrick COUE (SAV)	1 517	2,35 %
2) Roazhon-Su	René GORVAN (SAV)	1 020	1,28 %
	Jacques DAVID (UDB)	845	1,06 %
3) Gwizhirieg	Bernard MACE (SAV)	468	1,18 %
4) Redon	Pierrig GUERINEL (SAV)	1 197	3 %
5) Felger	Henri VASSEUR (SAV)	1 782	4,23 %
6) Sant-Malo	Annaig ROY (SAV)	1 674	2,58 %

LIGER-ATLANTEL

1) Naoned-Reter	Jean-Claude RIVALLAIN (SAV)	1 005	1,53 %
2) Naoned-Kornog	Lionel DIVARD (SAV)	504	0,96 %
	Alain TASSEL (UDB)	427	0,81 %
3) Boue	Lucien DIVARD (SAV)	539	1,02 %
4) Ansiniz	Liane SURZUR de LOBEL (SAV)	965	1,56 %
5) Kastell-Briant	Jeanine GOUEZ (SAV)	2 549	6,39 %
6) Sant-Nazer	Alexandre LE FUR (SAV)	1 118	1,91 %
7) Gwenrann	Michel BARRE (SAV)	1 156	2,62 %
8) Pembo	Pierre MANAC'H (SAV)	758	1,48 %

MORBIHAN

1) Gwened	Robert DERRIEN (SAV)	1 452	2,50 %
2) Porzh-Loeiz	Paulin JENOT (SAV)	1 649	3,74 %
4) Plouarzel	Loik CAMUS (SAV)	357	0,97 %
5) An Oriant	Alain RAUDE (SAV)	719	1,27 %
6) Henbont	Henri PUNGIER (SAV)	766	1,74 %
	Erwan EVENOU (UDB)	1 400	3,19 %

Dereat a-walc'h eo an disoc'hoù-se dre vras evit ur wech kentañ, dreist-holl pa verker n'eus ket bet graet kalz bruderezh peurliesañ gant danvez-kannaded SAV (dre ziouer a stourmerion er strolladig nevez-krouet-se). Ar gudenn evit al luskadoù rannvroelour a vo ober o mad eus an tammig brud o deus dastumet da geñver an dilennadegoù-se evit tutañ ha prientiñ an dilennadegoù da zont (da skouer an dilennadegoù kantonel en diskar-amzer 1973). Ouzhpenn-se e chom kudenn an arc'hant: n'eus nemet un danvez-kannad, an Itron GOUEZ e Kastellbriant hag he deus bet ouzhpenn 5 % eus ar mouezhiadoù hag a zo bet daskoret dezhi ar 1 000 F lezet gant pep danvez-kannad araok an dilennadegoù. Kollet he deus eta an U.D.B. 5 000 F ha S.A.V. 25 000 F, hep kontañ evel-just an holl zispignoù all, kalz ponneroc'h evit kef al luskadoù-se. An arc'hant eo dreist-holl en doa miret ouzh an emsaverion kemer perzh betekhen en dilennadegoù. Ur "madoberour" o deus kavet paotred SAV ar wech-mañ. Hag eñ en devo arc'hant c'hoazh evito en dazont ?

Gant Pierre LE MOINE ez a ar maout

Dastumet he deus an Itron GOUEZ (SAV) e Kastellbriant 6,39 % eus ar mouezhiadoù eztaolet d'ar 4 a viz meurzh 1973. Gant Pierre LE MOINE e chom eta ar maout. D'an 23 a viz du 1958 e tastumas 3 527 mouezh (war 48 901), da lavarout eo 7.3 % e pastell-vro Gwengamp ! Dasparzhet e voe ar mouezhiadoù evel-mañ :

64 439 mouezhier enskrivet	48 901 mouezhiad eztaolet
LE CAROFF (PCF)	12 846
LE GUEN (MRP)	11 757
THOMAS (Sokialour)	10 209
Le MONNIER (RGR)	4 594
THOMAS (UNR)	3 527
<u>Pierre LEMOINE</u>	<u>3 527</u>
NOVELLO	1 392
LEBERGER	1 049

A-zivout Pierre LE MOINE e ranker merkañ ivez e voe eñ ar broadelour nemetañ da vezañ dilennet d'ur garg kefridiel a-bouez, da geñver un dilennadeg rannel e 1967. Kuzulier-kêr e voe dilennet e Kemper d'ar 17 a viz kerzu 1967. War 28 285 mouezhier enskrivet, setu penaos e voe dasparzhet ar mouezhioù :

	Tro gentañ (10/12/67)	Eil tro (17/12/67)	
HAMON (PCF)	3 875	8 066	
<u>LE MOINE</u>	<u>3 178</u>	<u>10 655</u>	dilennet (56,9 % !)
PINSON (FGDS)	2 376		(mouezhierion : 19 087 67,49%
LAURENT (CD)	2 662		divouezhierion : 9 198 32,51%
NADER (Indépendant)	2 378		mouezhiadoù eztaolet : 18 721)

DILENNADegoù AR GANNADed E BREIZH

Studienn gant Yann MORVAN

Eil pennad : Ar Bempvet Republik (abaoe 1958)

Meur a zilennadeg a zo bet aozet abaoe derou ar Bempvet Republik er riez gall, dilennadegoù ar gannaded :

- 23 ha 30 a viz du 1958
- 18 hag 25 a viz du 1962
- 5 ha 12 a viz meurzh 1967
- 23 ha 30 a vezheven 1968
- 4 hag 11 a viz meurzh 1973

met ivez dilennadegoù evit dibab al leviour (=prezidant) e 1965 ha 1969. Ouzhpenn se e voe galvet c'hoazh ar Frañsiz da vouezhiañ da geñver pobl-atersoù (referendomoù) e 1958, 1961, 1962, 1965, 1969 ha 1972, diwar-benn kudennoù liesseurt (frankiz Aljeria, dilennadur al leviour, ledanadur ar C'henvarc'had europat, h.a...)

Disheñvel a-walc'h eo ampegadoù ar vuhez politikel abaoe 1958 diouzh pezh e oant da vare ar Bedervet Republik (gwelout niverenn diwezhañ Imbourc'h). N'eo ket dilennet ken ar gannaded e framm an departamantoù met didroc'het eo bet adarre ar re-mañ e pastelloù bihanoc'h, pemp evit "Aodoù-an-Hanternoz", eizh evit "Penn-ar-Bed", c'hwec'h evit "Izol-ha-Gwinun", eizh evit "Liger-Atlantel" ha c'hwec'h evit "Morbihan" (gwelout niverenn 38 Imbourc'h pp. 84 hag 85), da lavarout eo ez eus 33 c'hannad hiziv pemp departamant Breizh e-lec'h 39 araok.

Ne vez ket graet ken gant reizhiad an derc'houezadur kenfeuriek met gant an derc'houezadur muianiverel divdro. Evit bezañ dilennet e tle an danvez-kannad dastum ar muianiver dreistel en dro gentañ pe ar muianiver keñverel en eil tro. Da heul ar reizhiad-se e vez kreñvaet ar strolladoù kreñvañ ha gwanaet ar strolladoù gwanañ. Dister eo deuet da vezañ an niver a gannaded eus an tu kleiz e Breizh abaoe 1958 daoust ma chome heñvel pe dost an niver a vouezhiadoù dastumet gant ar strolladoù eus an tu kleiz.

Ouzhpenn-se e tle pep danvez-kannad kinnig gantañ un amsavad evit ma kemero e lec'h ma c'hoarvez gantañ mervel pe reiñ e zilez araok an dilennadegoù hollek. N'eus ket mui a zilennadegoù darnel eta, pezh a zo fall ivez evit ar strolladoù bihan evel ur strollad broadelour. E Breizh-Veur e voe dilennet da geñver dilennadegoù rannel (pe darnel) tri eus ar pevar c'hannad broadelour dilennet abaoe 1945.

Ne vez dastalet o mizoù bruderezh kefridiel (1 000 F evit ar mare) d'an danvez-kannaded nemet ma teuont a-benn da zastum 5% eus ar mouezhiadoù, pezh a zo diaes da gaout e gwirionez evit ur strollad bihan d'an taol kentañ hag ouzhpenn-se e ranker kinnig 75 danvez-kannad dindan an hevelep skritell da vihanañ evit kaout ar gwir d'ober bruderezh er skingomz hag er skinwel. Berzet e vefe eta ouzh ur strollad politikel brezhon.

ANVIOU AR GANNADED E BREIZH E-PAD AR BEMPVET REPUBLIK

(22) Acdoù-an-Hanternoz : 5 kannad

	1958	1962	1967
1)	RAULT MRP	RICHET UNR	LE FOLL PSU
2)	PLEVEN Rép.d'Union	PLEVEN R.U.	PLEVEN R.U.
3)	Melle DIENESCH MRP	Melle DIENESCH MRP	Melle DIENESCH UNR
4)	LE GUEN MRP	LE GUEN MRP	OLLIVRO Union Centriste
5)	BOURDELLES Centre Rép.	BOURDELLES C.R.	BOURDELLES R.U.

  

	1968	1973
	CHARLES distrollad	LE FOLL PSU
	PLEVEN R.U.	JOSSELIN PGSD-PS
	Melle DIENESCH UDR	Melle DIENESCH UDR
	OLLIVRO PDM	OLLIVRO CDP
	BOURDELLES R.U.	BOURDELLES CDP

(29) Penn-ar-Bed : 8 kannad

	1958	1962	1967
1)	NADER UNR	EVARD UNR	MICHELET UNR
2)	LOMBARD IPAS	LE GOASGUEN	LOMBARD PDM
3)	de POULPIQUET UNR	de POULPIQUET UNR	de POULPIQUET UNR
4)	LE DUC IPAS	Tanguy PRIGENT PSU	PRAT PSU
5)	PINVIDIC R.I. ha Paysan	CAILL UNR	CAILL UNR
6)	CROUAN IPAS	Mme PLOUX UNR	Mme PLOUX UNR
7)	TRELLU R.P.& C.D.	TRELLU R.P.& C.D.	MIOSSEC UNR
8)	ORVOEN R.P.&C.D.	ORVOEN MRP	ORVOEN C.D.

  

	1968	1973
	MICHELET UDR	BECAM UDR
	BENNETOT UDR	BENNETOT UDR
	de POULPIQUET UDR	de POULPIQUET UDR
	LELONG UDR	LELONG UDR
	CAILL UDR	CAILL UDR
	Mme PLOUX UDR	Mme PLOUX UDR
	MIOSSEC UDR	GUERMEUR UDR
	PETIT UDR	LE PENSEC UGSD-PS

Notenn : I.P.A.S. = "Indépendant Paysan d'Action Sociale" (kreiz)

R.P. & C.D. = "Républicain Populaire et Centre Démocrate" (demokrat-  
kristen)

(35) Izol-ha-Gwinun : 6 kannad

	1958	1962	1967
1)	FREVILLE R.P.& C.D.	FREVILLE MRP	FREVILLE CD
2)	JOUAULT URN-CNI	LE DOUAREC UNR	LE DOUAREC UIR
3)	MEHAIGNERIE RP & CD	MEHAIGNERIE MRP	MEHAIGNERIE CD
4)	RENOUARD Entente Dém.	RENOUARD Ent. Démocr.	RENOUARD R.I.
5)	de BENOUILLE UNR	LE LANN CNI	COINTAT UNR
6)	COUDRAY RP & CD	BOURGES UNR	BOURGES UNR

	1968	1973
	CRESSARD UDR	CRESSARD UDR
	LE DOUAREC UDR	LE DOUAREC UDR
	LASSOURD UDR	MEHAIGNERIE CDP
	RENOUARD RI	RENOUARD R.I.
	COINTAT UDR	COINTAT UDR
	BOURGES UDR	BOURGES UDR

(44) Liger-Atlantel : 8 kannad

	1958	1962	1967
1)	REY UNR	REY UNR	REY UNR
2)	ORRION CNI	DASSIE UNR	CHAUVEL FGDS
3)	ROBICHON IPAS	MAQUET UNR	MAQUET UNR
4)	de SESMAISONS CNI	de SESMAISONS CNI	MAUJOUAN du GASSET R.I.
5)	LAMBERT MRP	HUNAUULT distrollad	HUNAUULT distrollad
6)	ROMBEAUT MRP	BLANCHO SFIO	CARPENTIER FGDS
7)	LE DOUAREC UNR	LITOUX UNR	GUICHARD UNR
8)	de GRANDMAISON CNI	RICHARD UNR	RICHARD UNR

	1968	1973
	REY UDR	BOLO UDR
	DASSIE UDR	CHAUVEL UGSD-PS
	MACQUET UDR	MACQUET UDR
	MAUJOUAN du GASSET R.I.	MAUJOUAN du GASSET R.I.
	HUNAUULT distrollad	HUNAUULT distrollad
	CARPENTIER FGDS	CARPENTIER UGSD-PS
	GUICHARD UDR	GUICHARD UDR
	RICHARD UDR	RICHARD UDR

---

Notenn : URN = "Union pour le regroupement national" (tu dehou)

(56) Morbihan : 6 kannad

	1958	1962	1967
1)	MARCELLIN R.I.	MARCELLIN UNR	MARCELLIN UNR
2)	BONNET Dém. Chrét.	BONNET UNR	BONNET UNR
3)	LAUDRIN Union	LAUDRIN UNR	LAUDRIN UNR
4)	du HALGOUET Ind. Pays.	du HALGOUET R.I.	du HALGOUET R.I.
5)	LE MONTAGNER CNI	BARDET UNR	MESSMER UNR
6)	IHUEL MRP	IHUEL C.D.	IHUEL PDM

	1968	1973
	MARCELLIN UDR	MARCELLIN R.I.
	BONNET UDR	BONNET R.I.
	LAUDRIN UDR	LAUDRIN UDR
	du HALGOUET UDR	BOUVARD Réf. C.D.
	VITTON UDR	ALLAINMAT UGSD-PS
	IHUEL PDM-C.D.	IHUEL Réf. C.D.

NIVER A VOUEZHIERION ENSKRIVET

	1958	1962	1967	1968	1973
(22)	333 311	330 627	323 627	325 298	341 136
(29)	499 977	498 967	487 013	492 404	399 253
(35)	373 984	375 832	381 851	382 739	411 196
(44)	470 591	475 505	490 792	495 200	541 817
(56)	342 242	339 096	327 724	334 926	349 420
<b>BREIZH</b>	<b>2 020 105</b>	<b>2 020 027</b>	<b>2 011 007</b>	<b>2 030 567</b>	<b>2 042 822</b>

NIVER A VOUEZHIERION O VOUEZHIAN

	1958		1962		1967		1968		1973	
(22)	264 119	79,24 %	229 044	69,27 %	275 058	84,99 %	273 362	84,03 %	288 341	84,52 %
(29)	397 028	79,41 %	346 635	69,47 %	403 070	82,76 %	402 041	81,64 %	320 647	80,31 %
(35)	296 703	79,33 %	256 964	68,37 %	315 096	82,52 %	312 203	81,57 %	336 997	81,95 %
(44)	374 224	79,52 %	336 432	70,75 %	403 465	82,21 %	403 309	81,44 %	434 337	80,16 %
(56)	268 678	78,51 %	233 559	68,87 %	276 830	84,47 %	271 375	81,02 %	289 560	82,86 %
<b>BREIZH</b>									<b>1 669 882</b>	<b>81,75 %</b>



NIVER A ZIVOUEZHIERION

	1958		1962		1967	
(22)	69 192	20,76 %	101 583	30,73 %	48 569	15,01 %
(29)	98 949	20,59 %	152 332	30,53 %	83 943	17,24 %
(35)	77 281	20,67 %	119 868	31,63 %	66 755	17,48 %
(44)	96 367	20,48 %	139 073	29,25 %	87 327	17,79 %
(56)	73 564	21,49 %	105 537	31,13 %	50 894	15,53 %

  

	1968		1973	
	51 936	15,97 %	52 795	15,48 %
	90 363	18,36 %	78 606	19,69 %
	70 536	18,43 %	74 199	18,05 %
	91 891	18,56 %	107 480	19,84 %
	63 551	18,98 %	59 860	17,14 %

NIVER A VOUEZHIADOU DASTMET GANT PEP STROLLAD

(22) Aodoù-an-Hanternoz

1962	Mouezhiadoù eztaolet	PCF	PSU	SFIO	Rad.C.G.	UNR-UDT	MRP	RI
	222 273	60 544	28 685	5 267	45 269	41 816	39 903	10 689

1967	M. eztaolet	PCF	PSU	FGDS	VvetRep.	"Div.Mod"	CD	ARLP
	271 448	69 002	30 803	7 926	86 131	15 609	61 398	579

1968	M. eztaolet	PCF	PSU	FGDS	"Div.g."	UDR	PDM	"Div.d"	Talbenn Breizhat
	269 615	60 432	41 467	11 022	3 714	49 199	70 816	31 963	1 002

1973	M. eztaolet	PCF	PSU	PS	Réf.	CDP	UDR	SAV	LO+LC
	287 779	65 590	30 602	36 291	11 130	73 313	55 711	4 436	1 911

(29) Penn-ar-Bed

1962	M. eztaolet	PCF	PSU	SFIO	Rad.C.G.	UNR-UDT	MRP	RI	CNI	"Div."
	342 045	60 544	14 712	27 455	8 534	125 645	80 860	6 250	20 101	6 193

1967

M.eztaolet	PCF	PSU	FGDS	Vvet Rep.	"Div. Mod."	C.D.
398 829	72 597	16 576	34 915	159 210	16 581	98 950

1968

M. eztaolet	PCF	PSU	FGDS	UDR	PDM	"Div.droite"
396 153	70 106	20 316	23 838	193 887	86 504	1 501

1973

M.eztaolet	PCF	PSU	PS	Réf.	UDR	RI	SAV	UDB	Re all
414 273	66 121	9 619	82 453	67 753	53 772	21 383	4 535	3 390	7 287

(35) Izol-ha-Gwinun

1962

M.eztaolet	PCF	PSU	SFIO	Rad.C.G.	UNR-UDT	MRP	RI	CNI
248 690	24 995	5 178	12 913	3 065	78 749	72 649	27 451	23 690

1967

M. eztaolet	PCF	PSU	FGDS	VvetRep.	"Div."	C.D.
308 303	30 963	11 198	38 431	132 673	6 327	88 710

1968

M.eztaolet	PCF	PSU	FGDS	UDR	PDM	"Div.dr."	Talbenn breizhat
306 823	26 551	14 289	22 107	165 904	53 873	22 942	1 157

1973

M.eztaolet	PCF	PSU	PS	UDR	CDP	Réf.	R.I.	SAV	UDB
336 997	35 596	3 179	54 454	126 999	22 532	21 630	18 419	7 658	845

(44) Liger-Atlantel

1962

M.eztaolet	PCF	PSU	SFIO	UNR-UDT	MRP	R.I.	CNI	"Div."
327 388	35 392	2 658	39 211	94 792	61 698	49 583	40 493	3 561

1967

M.eztaolet	PCF	PSU	FGDS	"Div.g."	VvetRep.	"Div.Mod."	C.D.	Dehou pell.
398 754	43 354	8 544	72 549	9 066	171 253	12 480	68 765	9 743

1968	M.eztaolet	PCF	PSU	FGDS	UDR	PDM	"Div.dr."	Dehou pellañ
	397 106	36 590	25 551	72 027	178 937	46 090	36 730	1 181

1973	M.eztaolet	PCF	PSU	PS	Réf.	UDR	CDP	RI	SAV
	434 337	46 737	11 961	94 114	53 369	140 755	16 317	38 999	8 594

UDB	IND.	LO+LC	Dehou pellañ
427	9 473	4 340	2 173

(56) Morbihan

1962	M.eztaolet	PCF	SFIO	UNR-UDT	MRP	RI	CNI	"Div."
	225 909	30 815	29 556	49 303	46 107	58 903	9 460	1 765

1967	M.eztaolet	PCF	PSU	FGDS	VvetRep.	"Div.mod."	C.D.
	272 134	41 082	4 414	34 698	137 208	14 379	40 353

1968	M.eztaolet	PCF	PSU	FGDS	UDR	PDM	"Div.dr."
	267 493	36 267	6 357	33 819	153 469	35 106	2 475

1973	M.eztaolet	PCF	PSU	PS	UDR	R.I.	"Réf."	SAV	UDB	Re all
	289 560	38 889	2 842	51 380	28 750	95 015	46 437	4 943	1 400	13811

UN NEBEUT TITOUROU DIWAR-BENN ARMERZH BREIZH

Ur ger a-raok

E 1970 en doa embannet dija Imbourc'h (niverenn 7) un nebeut stadegoù diwar-benn armerzh ha poblañs Breizh. En niverenn-mañ e kinnig adarre d'e lennerion stadegoù o tennañ da armerzh ha poblañs hor bro, stadegoù niverusoc'h ha klokoc'h dre vras. Ar stadegoù embannet e 1970 a selle ouzh ar bloaz 1966 dreist-holl (hag ivez un nebeut ouzh 1962 ha 1968). Sellout a ra ar stadegoù-mañ ouzh ar bloaz 1969 dreist-holl (hag ivez un nebeut ouzh 1968 ha 1970).

Souezhet e vo moarvat al lennerion o welout an dale a zo gant ar stadegoù-mañ. Tennet int eus Annuaire Statistique de la France (Bloazlevr-stadegoù Frañs) deuet er-maez e Paris e dibenn 1972. Brudet eo er c'hontrol an I.N.S.E.E. (Ensavadur Riezel ar Stadegoù hag ar Studioù Armerzhel) evit e efedusted ha kalz hiroc'h eo an dale e riezoù all. Evel-just ne vefe ket ken hir-se ma vefe kreizennet e Breizh ar stadegoù o sellout outi ha ret eo mont da besketa etre ar stadegoù riezel dre zepartamant ar stlennadoù o sellout ouzh hor bro. Digreizennet eo ivez an I.N.S.E.E. er rannbarzhioù met o vezañ m'emañ Bro-Naoned er rannbarzh "Pays de la Loire" (kreizenn stadegel diazezet e Naoned) e chom diglok stadegoù ar rannbarzh steuñvel "Bretagne" (kreizenn stadegel e Roazhon) evit reiñ deomp ur skeudenn wirion eus armerzh hor bro.

Emañ kreizenn Naoned o paouez embann ur bloazlevr stadegel klok-tre evit ar rannbarzh "Pays de la Loire", puilh ennañ ar stlennadoù diwar-benn Bro-Naoned. Siwazh n'eus ket tu d'o strollañ gant stlennadoù ar rannbarzh "Bretagne" rak kozh-Noe eo ar bloazlevr diwezhañ o sellout ouzh ar rannbarzh-se. Evit kaout stadegoù kempred e ranker ober eta gant ar bloazlevr riezel embannet e Paris hag evel-just n'eo ket ken klok-se.(1)

---

(1) Ret eo deomp dinac'h kement labour ha ne sell ket ouzh Breizh en he fezh. Didalvoud-krenn eo da skouer levr an Ao. PHILIPONNEAU Debout Bretagne (War-sav Breizh) daoust dezhañ bezañ ul labour aketus ha kempenn rak ne gemer ket e kont Bro-Naoned a-hed e levr ! Er rannvro-se emañ avat ouzhpenn ur palevarzh eus poblañs hor bro hag ouzhpenn un drederenn eus hec'h ijinerezhioù greantel !

Gorread ha poblañs e 1968

Departamant	Pastell-vro	Kanton	Kumun	Gorread e km <sup>2</sup>	Poblañs hollel	Tudegezh ann/km <sup>2</sup>
22	4	48	385	6 877,61	506 100	74
29	4	43	286	6 785,02	768 900	113
35	4	43	359	6 757,82	652 700	97
44	4	46	224	6 893,27	861 500	125
56	3	38	263	6 763,48	540 500	80
<b>BREIZH</b>	19	218	1 517	34 077,20	3 329 700	97,7

Poblañs hollel (e miliadoù annezidi)

Departamant	1968		1969		1970
	1añ genver	kreiz ar bloaz	1añ genver	kreiz ar bloaz	1añ genver
22	507,2	507,2	507,2	507,4	507,5
29	770,4	771,5	772,6	773,9	775,3
35	653,3	656,2	659,1	662,2	665,4
44	861,6	865,7	869,8	874,3	878,8
56	541,4	541,8	542,2	542,7	543,1
<b>BREIZH</b>	3 333,9	3 342,4	3 350,9	3 358,5	3 370,1

Poblañs ar c'hêrioù pennañ (a-us da 50 000 annezad)

	Poblañs d'ar 1añ meurzh 1968	Emdroadur bloaziek hollel	bloaziek trauztiriañ	Niver a diez (1/3/68)	Niver a annezioù
<b>NAONED</b>					
kêr	259 208	+1,3 %	+0,3 %	36 565	89 225
tachad kêrel	393 208	+2 %	+ 1 %	68 054	129 063
<b>ROAZHON</b>					
kêr	180 943	+ 3 %	+1,6 %	20 206	60 285
tachad kêrel	192 782	+3,1 %	+1,7%	22 749	63 820
<b>BREST</b>					
kêr	154 023	+2,1%	+0,8%	19 411	51 466
tachad kêrel	169 279	+ 2 %	+0,8%	23 321	56 264

SANT-NAZER					
kêr	63 289	+1,4 %	+0,3 %	12 408	20 466
tachad kêrel	110 897	+ 1 %	+0,1%	32 328	48 166
AN ORIENT					
kêr	66 444	+1,5 %	+0,4 %	10 366	22 352
tachad kêrel	98 655	+ 1,8 %	+0,7 %	18 337	33 062
SANT-BRIEG					
kêr	50 281	+2,5 %	+1,5 %	10 090	16 439
tachad kêrel	67 121	+2,6 %	+1,5%	15 030	21 931
KEMPER					
kêr	52 496	+2,2 %	+1,2 %	11 199	17 017

Emdroadur naturel ar boblañs e 1969

Departamant	Poblañs keitat e 1969	Dimeziou	Torrou-dimeziñ	Ganedigezhioù		
				hollel	reizhek	direizhek
22	507 400	4 093	144	8 285	8 045	245
29	773 900	6 028	195	12 775	12 376	399
35	662 200	5 256	192	12 272	11 855	417
44	874 300	7 136	359	16 347	15 581	766
56	542 700	4 330	138	9 514	9 143	371
<b>BREIZH</b>	<b>3 360 500</b>	<b>26 843</b>	<b>1 028</b>	<b>59 193</b>	<b>57 000</b>	<b>2 193</b>

Departamant	Marvoù	Marvoù ar c'hrouadurioù (dindan ur bloaz)	Ouzhpennad ar ganedigezhioù war ar marvoù
22	6 854	139	+ 1 431
29	9 715	176	+ 3 060
35	7 306	204	+ 4 966
44	9 766	253	+ 6 581
56	7 121	149	+ 2 393
<b>BREIZH</b>	<b>40 762</b>	<b>921</b>	<b>+ 18 431</b>

Feurioù-poblañsouriezh evit 1 000 annezad (e 1969)

Departanant	Feur-dimeziñ	Feur-genel	Feur-mervel	Feur-kreskiñ naturel	Feur-mervel ar c'hrouadurioù
22	8,1	16,3	13,5	+2,8	16,8
29	7,8	16,5	12,6	+3,9	13,8
35	7,9	18,5	11	+7,5	16,7
44	8,2	18,7	11,2	+7,5	15,5
56	8	17,5	13,1	+4,4	15,6
BREIZH	7,98	17,6	12,1	+5,5	15,5

Emdroadur naturel ar boblañs e 1970

Departanant	Poblañs hollet d'ar 1/1/1970	Dimezioù	Torroù-dimeziñ	Ganedi-gezhioù	Marvoù	Marvoù ar c'hrouadurioù	Ouzhpennad naturel
22	507 500	4 395	153	7 881	6 534	84	+ 1 347
29	775 200	6 146	240	13 683	9 546	163	+ 4 137
35	665 400	5 532	230	12 886	7 357	241	+ 5 529
44	878 600	7 095	375	17 089	9 280	258	+ 7 809
56	543 200	4 448	149	9 590	6 678	132	+ 2 912
BREIZH	3 369 900	27 616	1 147	61 129	39 395	878	+ 21 734

Feurioù-poblañsouriezh e broioù all e 1970 (evit 1 000 annezad)

Riez	Feur-dimeziñ	Feur-genel	Feur-mervel	Feur-kreskiñ	Feur-mervel ar c'hrouadurioù	Tudegezh
Frañs	7,7	16,7	10,6	+ 6,1	16,4	93 ann./km <sup>2</sup>
Alamagn ar C'hornog	7,2	13,3	11,7	+ 1,6	23,2	240 ann./km <sup>2</sup>
Italia	7,4	16,8	9,7	+ 7,1	30,3	178 ann./km <sup>2</sup>
Izelvroioù	9,5	18,3	8,4	+ 9,9	13,2	388 ann./km <sup>2</sup>
Belgia	7,5	14,8	12,7	+ 2	21,7	317 ann./km <sup>2</sup>
Luksembourg	6,4	13	12,2	+ 0,8	24,9	131 ann./km <sup>2</sup>
Breizh-Veur	8,5	16,2	11,8	+ 4,4	18,6	228 ann./ km <sup>2</sup>
Stadoù-Unanet	10,7	18,2	9,4	+ 8,8	20,8	22 ann./km <sup>2</sup>
Unvaniezh Soviedel	9,7	17,4	8,2	+ 9,2	25,8	10,8 ann./km <sup>2</sup>

Arhoali keitat (bloavezhioù)

Riez	Gwazed	Merc'hed
Frañs	68	70,5
Alamagn ar c'hornog	67,6	73,6
Italia	67,2	72,3
Izelvroioù	71	76,4
Belgia	67,7	73,5
Luksembourg	61,7	65,8
Breizh-Veur	68,7	74,9
Stadoù-Unanet	66,6	74
Unvaniezh Soviedel	65	74

Dasparzh ar boblañs dre oad ha dre rev e 1962 (1968 evit Liger-Atlantel)

Oadoù	22		29		35	
	Gwazed	Merc'hed	Gwazed	Merc'hed	Gwazed	Merc'hed
0-14	68 853	62 167	94 648	91 450	82 484	80 088
15-19	20 087	19 699	28 532	27 974	25 171	24 879
20-24	14 509	12 722	21 090	19 702	20 089	18 895
25-34	31 036	29 578	47 328	46 591	39 917	40 520
35-44	32 930	31 878	49 087	49 445	39 313	40 385
45-54	28 018	29 044	43 537	46 178	32 781	34 719
55-64	29 075	33 307	41 459	48 016	30 855	36 646
65-74	14 802	26 473	22 239	36 828	15 629	28 247
75 hag ouzhpenn	6 729	16 396	12 081	23 216	6 662	16 995
Hollad	240 839	261 264	359 998	389 400	292 901	321 374

44		56	
Gwazed	Merc'hed	Gwazed	Merc'hed
112 740	109 288	72 451	70 282
40 556	40 008	21 417	20 517
33 788	33 748	15 973	13 635
48 344	50 044	35 374	33 619
55 864	56 964	34 860	33 832
42 024	44 012	29 158	30 548
41 260	47 076	27 161	31 451
24 652	38 676	13 905	24 380
21 320	28 236	6 969	15 513
410 748	448 052	257 268	273 776



N'eus ket kalz a dalvoudegezh gant ar sifroù o-unan. Pezh a zo dudius eo ober keñveradennoù, keñveradennoù gant broioù all pe geñveradennoù gant prantadoù-amzer all. Setu perak e vo talvoudus evit al lennerion adkemer niverenn 7 Imbourc'h (pajennoù 174 da 182) ha mirout an niverenn-mañ (hag an niverenn da heul) da c'hortoz ma vo embannet stadegoù all e 1975 pe 1976.

Un nebeut evezhiadennoù diwar-benn ar boblañsouriezh vrezhon.

E 1962 e oa 3 199 954 annezad e Breizh ha 3 370 100 e derou 1970. Emañ o kreskiñ eta poblañs hor bro, goustadik moarvat met kreskiñ a ra. Da heul brezel drastus 1914-1918 hag an divroerezh stank war-du Bro-C'hall dreist-holl, n'he doa ket kresket koulz lavaret poblañs Vreizh e-pad hogosik pergont vloaz ha war zigreskiñ e oa aet zoken ar boblañs e tachadoù bras, dreist-holl en "Aodoù-an-Hanternoz". Stank eo c'hoazh an divroerezh hiziv, dreist-holl e-touez ar re yaouank, met kreskiñ a ra un nebeut ar boblañs bep vloaz abaoe 1954.

Tremenet eo an dudegezh e Breizh eus 94 annezad dre gilometrad karrezek e 1962 da 99 ann./km<sup>2</sup> e 1970 ha moarvat da ouzhpenn 100 ann./km<sup>2</sup> hiziv. Un tammig uheloc'h eo eget tudegezh Frañs (93 e 1970) met n'heller ket lavarout ez eo poblet-stank hor bro e-keñver riezoù all Kornogeuropa : Italia 178 ann./km<sup>2</sup>, Breizh-Veur 228 ann./km<sup>2</sup>, Alamagn ar C'hornog 240 ann./km<sup>2</sup>, Belgia 316 ann./km<sup>2</sup> hag an Izelvroioù 388 ann./km<sup>2</sup> ! Plas a zo c'hoazh e Breizh evit kalz tud hag o vezañ ma n'eus ket en hor bro dezerzhioù pe venezioù uhel, n'eus lec'h ebet koulz lavaret na c'hellfe ket bezañ annezet hag aes e vefe kaout e Breizh teir gwech muioc'h a dud, gant ma heuilhfe armerzh ar vro evel-just.

Dudius eo ivez sellout ouzh kresk ar boblañs e pep departamant lerc'h-ouzh-lerc'h. Ret eo kounaat ne greske ket ha zoken ez ae war zigreskiñ poblañs "Morbihan" ha dreist-holl "Aodoù-an-Hanternoz" abaoe ar brezel-bed kentañ. Setu m'emañ o kreskiñ adarre un tammig bihan met evel-just e kresk dreist-holl ar boblañs e Bro-Roazhon hag e Bro-Naed, enno ijinerezhioù greantel niverus a-walc'h. Tremenet eo poblañs "Izol-ha-Gwinun" eus 614 268 annezad e 1962 da 665 400 e 1970 ha poblañs "Liger-Atlantel" eus 803 372 e 1962 da 878 800 e 1970. E-keit-se e tremene poblañs "Aodoù-an-Hanternoz" eus 501 923 da 507 500, koulz lavaret netra.

Evit gwir n'eo ket a-walc'h sellout ouzh ar stadegoù-se dre vras. Evit meizañ mat emroadur an traoù e vefe ret sellout dre ar munud ouzh poblañs pep kumun. Pa seller ouzh an niveridigezhioù diwezhañ (1962 ha 1968) e weler pegen buan he deus digresket ar boblañs war ar maez. Diniver eo ar gouerion a zilez an douar evit mont d'ar c'hêrioù ha da heul ivez poblañs ar bourc'hioù bihan, kenwerzhourion ha micherioù all o deus kollet o c'hlianted. Er c'hontrol e kresk buan poblañs ar

c'hêrioù. Setu perak he deus gallet kêr Sant-Brieg, da skouer, tremen eus 43 142 annezad e 1962 da 50 281 e 1968, tra ma chome dister kresk ar poblañs en departamant. <sup>A</sup>raok dibenn ar c'hantved-mañ ne chomo tud koulz lavaret nemet e keodedoù Breizh hag un doare gouelec'h e vo deuet da vezañ diabarzh ar vro.

Brasañ kêr Vreizh e chom Naoned gant 259 208 annezad e 1968 (393 208 en tachad kêrel, da lavarout eo gant kumunioù Raezez (Rezé), Gwerzou (Vertou), Sant-Hermelen (Saint-Herblain), Begonez (Bouguenais), h.a...) Gant Sant-Nazer ez eus ouzhpenn un hanter vilion a dud o vevañ war aber al Liger. Da heul e teu Roazhon gant 180 943 annezad (192 782 hepken en tachad kêrel). Kalz bihanoc'h eo eget Naoned met kreskiñ a ra buanoc'h, dreist-holl er bloavezhioù diwezhañ (+3 % a-enep da 1,3 %). Da heul Naoned ha Roazhon e kaver Brest gant 154 028 annezad (169 279 en tachad kêrel), An Oriant gant 66 444 annezad (98 655), Sant-Nazer gant 63 289 (110 289), Sant-Brieg gant 50 281 (67 121) ha Kemper gant 52 496.

Mar sellomp bremañ ouzh emdroadur naturel ar boblañs, dreist-holl an niver a varvoù hag a c'hanedigezhioù, ne gaver ket kemmoù bras. Bez e voe 23 149 eured e 1966, 26 843 e 1969 ha 27 616 e 1970, 1 028 torr-dimeziñ e 1969 ha 1 147 e 1970, 59 193 ganedigezh e 1969 ha 61 129 e 1970, en o zouez 2 193 ganedigezh direizhek (3,7 % eus an hollad, pezh ne seblant ket kalz e kêrver broioù all) ha 37 738 marv e 1966, 40 762 e 1969 ha 39 395 e 1970.

Dudiusoc'h eo c'hoazh sellout ouzh ar feurioù. Tost eo ar feur-dimeziñ breizhat (7,98 %) eus feurioù Frañs (7,7 %), Alamagn ar C'hornog (7,4), Italia (7,4), Belgia (7,5) ha Breizh-Veur (8,5) met kalz izeloc'h eo eget feurioù an Izelvroioù (9,5), an Unaniezh Soviedel (9,7) hag ar Stadoù-Unanet (10,7).

Kalz uheloc'h e voe ar feur-genel breizhat eget ar feur-genel gall e-pad pell amzer met digresket en deus kalz etre 1948 ha 1953 dreist-holl hag abaoe e seblant bezañ stabilaet o tigrskiñ kalz gorrekoc'h. Diskennet eo ar feur-genel e Breizh eta eus 18,1 % e 1966 da 17,6 % e 1969, o tostaat mui-ouzh-mui ouzh ar feur-genel gall (16,7 %). Tost-tre eo da feur an Unaniezh Soviedel (17,4 %), izeloc'h eget feur ar Stadoù-Unanet (18,2 %° pe an Izelvroioù (18,3 %°).

N'eo ket souezhus e teufe enzalc'h ar C'hallaoued e-keñver an engehenterezh da vezañ muioc'h-mui hini ar Vreizhiz, da heul ar c'hêriekaat, levezon ar c'helaouennoù gall, ar skingomz hag ar skinwel gall hag ar gallekadur dre vras. Ouzhpenn-se en deus kresket kalz rez-bevañ ar boblañs abaoe ugent vloaz ha war gozhañ ez a levezon an Iliz hag ar feiz kristen er rummadoù yaouank. Met an abeg pennañ eo koshadur ar boblañs gant divroadur ar re yaouank. Kentelius eo keñveriañ Breizh gant an Izelvroioù, daoust d'ar riez-se bezañ poblet-stank, gantañ uhelañ tudegezh ar bed : tost da 400 annezad dre gilometrad karrezek hiziv !

Dedennus eo sellout ivez ouzh feur-mervel ar c'hrouadurioù (bugale dindan ur bloaz) evit anavezout stad ar vezekniezh en ur vro. Izel-tre eo da skouer en Izelvroioù (13,2 %) hag e broioù al Lec'hleñn. E Breizh e save c'hoazh da 23,1 % e 1966 met da 15,5 % hepken e 1969 pezh a zo dereat-tre (uhel-tre e oa feur-mervel ar c'hrouadurioù araok ar brezel-bed kentañ e Breizh). An holl vammoù breizhat pe dost a ya bremañ da wilioudiñ e tiez-gwilioudiñ dindan evezh mezeion ha klañvdi-ourezed.

E-touez ar re uhelañ e Kornogeuropa eo ar feur-mervel hollek e Breizh : 11,5 % e 1966 ha 12,1 % e 1969. E 1970 e save da 10,6 % e Frañs, da 11,7 % en Alamagn ar c'hornog, da 9,7 % en Italia, da 8,7 % en Izelvroioù, da 12,7 % e Belgia ha da 11,8 % e Breizh-Veur. N'eo ket souezhus kavout ur feur-mervel uhel e Breizh gant kozhadur ar boblañs abaoe pemont vloaz.

Gant ar feur-mervel o kreskiñ hag ar feur-genel o tigrskiñ ez a war vihanaat ar feur-kreskiñ naturel, +6,6 % e 1966 ha +5,5 % e 1969. Ret e vefe derc'hel kont evel-just eus an divroañ hag an enbroañ evit anavezout kresk gwirion ar boblañs. Siwazh dre m'eo Breizh darn eus ar riez gall c'hoazh n'anavezer ket an treuztiriañ en un doare resis. N'eo ket rediet an dud evel en Unaniezh Soviedel da skouer da ziskleriañ o c'hemmadurioù-chomlec'h. Hag evel-just ne fell ket d'al levierezh gall embann sifroù resis a ziskouezfe splann stad wirion an traoù e Breizh ha pouez an divroerezh o kenderc'hel.

J. ar BIHAN

---

Stadegoù armerzhel ha kevredigezhel all a vo embannet en niverenn da zont.

---

## KELEIER LIESSEURT

### GERIADUR AR MOR

Emañ Imbourc'h o paouez embann ur geriadur armerzhel brezhoneg-galleg ha galleg-brezhoneg. Hepdale e vo embannet gant Kannadig Kêr-Vreizh geriadur ar mor, galleg-brezhoneg, ennañ ur bern gerioù dastumet gant Loeiz ANDOUARD hag en deus pledet a-hed e vuhez gant kudennoù ar mor, ar pesketaerezh hag ar verdeadurezh.

### BRO-FLANDREZ

D'ar 1añ a viz gouere 1973 e vo lidet e Diksmuide ar 46 vet "Ijzerbedevaart" ha mont a raio miliadoù ha miliadoù a vrogarourion flandrezat d'en em vodañ eno ur wech c'hoazh.

### AR JAPANIZ E KEMBRE

Emañ an embregerezh japanat bras "Sony Corporation" o sevel ul labouradeg e Bridgend e kreisteiz Kembre. Reiñ a raio labour da 300 den e 1975 ha kenderc'hañ a raio 5 000 skinwelerez e liv "Trinitron" bep miz.

AR STROLLAD BROADEL O VONT WAR-RAOK EN ALBA

Aozet eo bet un dilennadeg rannel e Dun Déagh (Dundee) d'ar c'hentañ a viz meurzh ha sebezet eo bet an holl gant berzh ar vroadelourion skosat. Ganto ned'eas : ket an trec'h met erruet eo an Ao. G. WILSON, danvez-kannad ar Strollad Broadel Skosat ("Scottish National Party") tost a-walc'h eus danvez-kannad al Labour ha das-tumet en deus muioc'h a vouezhioù eget danvez-kannaded ar strollad mirour hag ar strollad frankizour. Aet e vije an trec'h gant ar vroadelourion moarvat gant ma vijent chomet unanet met en em ginnig a reas ivez an Ao. G. MacLEAN (ur c'hweluniadour 48 vloaz) dindan ar skritell "Labour Party of Scotland" (Strollad Skosat al Labour), ur strolladig bihan diwanet diouzh un disrann eus tu kleiz-pellañ ar Strollad Broadel Skosat. Sebezus eo memestra an disoc'hoù rak, un nebeut mizioù zo, e seblante ar Strollad Broadel bezañ kollet e levezon dremenet er vro. Diskouez a ra an disoc'hoù-se e fell d'ur bern Skosiz kaout ur gouarnamant skosat gant un emrenerezh ledan, dreist-holl hiziv p'emañ ar c'hevredadoù saoz o sunañ an tireoul skosat diouzh kondon ar mor tra ma chom fall an degouezh armerzhel en Alba.

	Mouezhiadoù	Dregantad	(e 1970 kemm)
G. MACHIN Labour	14 411	32,7 %	48,3 % -15,6%
G. WILSON Strollad Broadel	13 270	30,2 %	8,9 % +21,3%
W. FITZGERALD Mirour	11 089	25,2 %	42,4% -17,2%
N. GORDON Frankizour	3 653	8,3 %	
G. MacLEAN Labour Party of Scotland	1 409	3,2 %	
J.S. THOMSON Independent	182	0,4 %	

Niver a vouezhierion enskrivet	Perzhiekaad
1970 61 625	75 %
1973 62 353 (+728)	70,6 % (-4,4 %)

DILENNADEGOU LEC'HEL E KEMBRE

Aozet e vo dilennadegoù lec'hel e Bro-Gembre hag e Bro-Saoz d'an 12 a viz ebrel 1973.

STAD AR GOUNEZEREZH IWERZHONAT

Goude m'eo bet degemeret Iwerzhon er C'henvarc'had Europat, ha ganti ivez Breizh-Veur ha Danmark, ez aeo war greskiñ ezporzhiadoù ar riez-se war-du ar c'hevandir, o kevezañ alies gant kenderc'hadoù Danmark ha Breizh rak c'hoarvezout a ra 60 % eus an ezporzhiadoù iwerzhonat eus kenderc'hadoù gounezel : kig, amann, keuz, h.a... Emañ c'hoazh 30,5 % eus ar boblañs-labour en Iwerzhon o labourat er gounezerezh-douar, da lavarout eo 320 000 labourer en holl. 270 000 atant a gaver er Republik, 70 % anezho dindan 20 hektar. Sevel a ra ar gorread gounezel da 4,7 milion hektar e lec'h ma vez maget 6,4 milion loen-chatal. Kreskiñ a ra buan ar magerezh abaoe un nebeut bloavezhioù ha mont a ra d'ober bremañ 80 % eus ar c'henderc'h gounezel.

### Mougadur en Euskadi

E dibenn miz c'hwevrer ez eo bet bac'het gant ar bolis spagnat 40 Euskarad, en o zouez 3 beleg ha 5 kloareg, o chom e Bilbao, Marquina hag Ondarroa, diskred warno da vezañ izili eus an aozadur-dieubiñ kuzh E.T.A. Daou anezho a vefe izili eus Herrikutxa (kef ar bobl), un aozadur kuzh a zo e gefridi dastum arc'hant evit E.T.A. Kavet he deus ivez ar bolis ur bern traktoù, ur bistolenn hag ardivinkoù-liestennañ.

D'ar 6 a viz meurzh e voe harzet 5 emsaver all gant ar polis spagnat a gav dezhi ez eus en o zouez skraperon ar greantelour Felipe HUARTE, lezet da vont gant E.T.A. goude bezañ paeet un werzh-daspren dereat-tre.

### Kendalc'h ar strollad kebegat

E dibenn miz c'hwevrer e voe dalc'het kendalc'h-bloaz ar Strollad Kebegat ("Parti Québécois") e Montréal ha 2 000 stourmer a gemeras perzh ennañ en anv eus 62 000 ezel ar strollad. Dilennet e voe ur gwazva-erounit nevez hag anvet e voe adarre da benn ar strollad an Ao. René LEVESQUE (gwelout niverenn 38 Imbourc'h paj. 87-103). Labourer o deus dreist-holl ar gendalc'hidi evit prientiñ an dilennadegoù rannvroel da zont e 1974 (d'an dilennadegoù rannvroel diwezhañ en doa dastumet ar strollad 24 % eus ar mouezhiadoù).

C'hoarvezout a ra roll-labour ar strollad kebegat, en degouezh maz afe ar galloud gantañ, eus ar poentoù pennañ-mañ : steuñvidigezh gwevn an armerzh kebegat, stadeladur darnel ar bankoù, astennidigezh ar gennad kevelouriel, kontrol war ar postadurioù estren, perzhiekaat al labourerion e mererezh o embregerezhioù, korvoder bloaziek izek evit an holl annezidi. Dre vras e fell d'ar vroadelourion gebegat kemer ar galloud politikel hag armerzhel klok en o bro ha diazezañ ur reizhiad tost a-walc'h eus hini Sweden.

### Harz-labour e skol-veur Roazhon

Abaoe an 26 a viz genver o deus paouezet ar studierion war ar vezekniezh da heuliañ ar c'hentelioù er skol-veur evit enebiñ ouzh stad reuzeudik ar vezekniezh e Breizh. N'eus nemet 85,4 mezeg er rannbarzh "Bretagne" evit 100 000 annezad hogen 115,4 ent keitat e Frañs. E-pad ma kreske poblañs Roazhon eus +75 % etre 1957 ha 1971 ne voe kresket niver ar gweleoù-ospital nemet eus + 10,9 % ! Azonus eo ar sifroù-se eus isdiorreadur keñveriek hor bro.

### Ec'hwel ar gelaouennerion iwerzhonat

Ar c'hevredad-kelaouiñ iwerzhonat "Irish Independent Newspapers" a zo bet seizet eus an 13 d'an 18 a viz meurzh gant ec'hwel ar gelaouennerion (180 anezho) a felle dezho enebiñ ouzh doareoù eus prenadur ar c'hevredad (a embann div bemdezieg Irish Independent hag Evening Herald hag ur sizhunieg Sunday Independent) gant ar mondian Tony O'REILLY, en deus paeet 5 700 000 lur saoz (65 milion F !) evitañ.

### An houarnouriezh kembreat

Sevel a ra ar boblañs-labour gourel e Kembre da 600 000 labourer hag un eizhvedenn anezho o labourat en houarnouriezh ! Ur greanterezh ponnergwirion he deus Bro-Gembre abaoe ouzhpenn ur c'hantved dre ma oa pinvidik he c'hondon e glaou. Kevredad riezal an dir (British Steel Corporation) a implij 225 000 den dre ar riez, en o zouez 60 000 Kembre met lamet e vo 50 000 gourc'hwel en dek vloaz a zeu, 17 500 anezho e Kembre dre ma vo klozet kalz kreizennoù bihan evit mirout hepken oaledoù houarnouriezh bras e Port-Talbot hag e Llanwern e kreisteiz ar vro (Lackenby ha Scunthorpe e Bro-Saoz, Ravenscraig en Alba). A-benn un nebeut bloavezhioù e savo da 10 milion tonenn barregezh-kenderc'hañ dir Kembre. Tremet a raio kenderc'h an uhelfornioù e Port-Talbot eus 3 milion t. hiziv da 6 milion t. hag e Llanwern eus 2 milion t. da 3,8 milion t.. Krouet e vo 1 300 gourc'hwel nevez e Port-Talbot ha 1 500 e Llanwern met lamet e vo 6 500 gourc'hwel e Shotton (Fflint), 4 500 e labouradegoù East Moors e Kêrdiz (Caerdydd, Cardiff) ha miliadoù all c'hoazh en Ebbw Vale hag e lec'hioù all.

### Cholori evit ar c'hembraeg

Disrenket eo bet an abadenn-skinwel "Open Houses" gant Pete MURRAY er B.B.C. gant tregont ezel eus Cymdeithas yr Iaith (kevredigezh ar c'hembraeg) deuet tre e labourvaoù-skinwel Llandudno en ur youc'hal luganoù a-du gant ar c'hembraeg, d'ar 1añ a viz meurzh. Taolet e voent buan er-maez gant ar bolis.

Izili all ar gevredigezh o deus aloubet labourvaoù skinwel e Bro-Saoz d'an hevelep mare, re an Independent Broadcasting Authority e Southampton ha re ar B.B.C. e Manchester, Plymouth ha Newcastle.

Paket e voe daou baotr hag ur plac'h e Manchester, Dewi WILLIAMS (19 vloaz), Elen HUWS (19) ha Derec ApSion (20) met lezet e voent da vont gant ar barner a lavaras dezho : "Keuz am eus da zinac'h ouzhoc'h bruderezh ur prosez".

Pemp emsaver all avat a vo barnet : Cathi MacGILL (20), Gaenor Elis WILLIAMS (22), Hywel TOMOS (20), Owain JONES (19) ha Wayne WILLIAMS (20).

D'ar 6 a viz meurzh e voe barnet 5 emsaver kembreat all a oa aet d'ober cholori ivez e labourvaoù ar B.B.C. e Bristol (Bro-Saoz). Tamallet e voe dezho bezañ graet war-dro 7 000 F freuz. Setu anvioù an emsaver yacuank-se : Selwyn JONES (18), Gwilym Hughes JONES (19), Huw Evans DAVIES (18), Gareth DOBSON (20) hag Ellis Dilwyn ROBERTS (20). N'anavezet ket c'hoazh disentez al lez-varn e Bristol.

D'ar 7 a viz meurzh e voe barnet gant ul lez-varn e London pemp plac'h eus Cymdeithas yr Iaith evit bezañ aet d'ober reuz e labourvaoù ar B.B.C. e London. Taolet e voe er-maez gant ar bolis an arvesterion a gane kanaouennoù kembreat. Kondaonet e voent da 30 lur tellgastiz ha lamet e voe diganto o yalc'hadoù-studi (300 lur bep vloaz bep hini). "Ne ra forzh, he deus respontet unan eus ar studierezed-se, ne fell ket deomp e vo levezonet hor bugale gant saozneg ar skinwel."

KUDENN NORZIWERZHON

D'ar yaou 8 a viz meurzh e voe aozet gant ar Saozon ur poblaters e Norziwerzhon evit goulenn o ali digant an annezidi diwar-benn dazont ar rannbarzh. 591 820 annezad (da lavarout eo 57,56 % eus ar vouezhierion en-skrevet) a ziskouezas o youl da chom e framm ar "Rouantelezh-Unanet" ha 6 463 hepken (0,62 %) a voe a-du evit en em stagañ ouzh ar Republik. Bez e voe ivez 5 973 bilhedig didalvoud (0,58%). Sevel a reas dregantad an divouezhierion da 41,4 % (dregantad an annezidi "katolik" a zo 35 %); pezh a ziskouez glann e voe heuliet mat kemennoù al luskadoù republikan evit boikotañ ar poblaters-se.

D'an hevelep deiz e tarzhas bombezennoù kuzhet e tankirri e kêr London oc'h ober ul lazhiad ha 243 gloaziad. Harzet e voe 10 den o vennout distreiñ da Norziwerzhon p'edont war-nes mont en nijerezh en aerborzh Heathrow. O vezañ ma n'en deus ket an I.R.A. sammet kiriegezh an taolioù-sponterezh-se e vezer techet da grediñ ez int bet sevenet gant ur bagadig stourmerion distag eus an aozadur republikan. Ren a ra abaoe an deiz-se un aergelc'h anken ha spont e Breizh-Veur.

D'an 20 a viz meurzh e voe embannet e London al Levr Gwenn ("White Paper") diwar-benn kudenn Norziwerzhon gwelet gant gouarnamant ar "Rouantelezh-Unanet". Hervez al levr-se e chomo Norziwerzhon e framm ar "Rouantelezh-Unanet" keit ha ma vo a-du darn vuiañ ar boblañs enni. Dilennet e vo breudoù gant an derc'houezadur kenfeuriek, enno 80 kannad, met gant parlamant London e chomo ar galloud-lezennañ. Gwarezet e vo gwirioù ar bihanniver "katolik"...

Degemeret mat a-walc'h e voe al levr-se gant gouarnamant Dulenn, gant 6 kannad an S.D.L.P. (strollad sokial-demokratel al labour) ha gant rener ar strollad unanour, Brian FAULKNER, da lavarout eo dre vras gant an dud kerreizh hag a youl vat. Distaolet eo bet avat gant an aozadurioù "protestant" pellañ, Vanguard (renet gant William CRAIG), ar strollad unanour demokratel (renet gant ar pastor faskour Ian PAISLEY), an U.D.A., al L.A.N., an "Ulster Defence Force" hag Urzh Orañj, da lavarout eo an dud na fell ket dezho koll o dreistgwirioù hag a nac'h diazezañ an demokratelezh (da vihanañ) er vro. Distaolet eo bet ivez gant an I.R.A. "da c'hortoz" a fell dezhi kenderc'hel gant he brezel-dieubiñ hag he deus nac'het groñs gourc'hemenn un arsav-brezel d'he stourmerion. Tu a zo d'en em c'houlenn ha n'eo ket heñchet emsaverion an I.R.A. "da c'hortoz" war un hent dall na zegas da nep lec'h nemet d'ur feulster dall ha d'ur boan vrasoc'h evit annezidi ar vro.

Keleier armerzhel

Emañ an Ao. BICH, "roue" ar voullbluenn BIC o paouez adprenañ darn vuiañ eus kevrennoù ar c'hevredad Bégy-DIM a genderc'h loeroù gwerzhet dre ar bed a-bezh. Div labouradeg he deus an afer e Breizh, unan e Naoned, egile e Sant-Nazer. Perc'henn al labouradeg Flaminaire e Redon e oa dija an Ao. BICH.

Gwall-chalet eo ar besketaerion e Breizh gant disentez ar gouarnamant marokat d'astenn e veli eus 12 da 70 mildouar diouzh aodoù ar riez rak mont a ra darn anezho da bestetañ ar sardin hag ar grilhed-mor du-hont.

---

### EZTENNEREZH AR SKAOTIL

Abaoe kantvedoù e vez eztennet skaotil (maerl) diouzh ar mor e Breizh en un doare dornwezhel : e plegoù-mor Sant-Malo ha Pempoull ha war uhelgompezennoù morel Glenan ha Molenez. Implijet eo ar felu-se evel temz-douar razek-magneziat e Breizh met ivez e Bro-C'hall, e Breizh-Veur, e Belgia, en Italia, en Alamagn, en Helvetia, e Sweden hag en Izelvroioù. Abaoe 1960 e vez korvoet ar binvidigezh-se en un doare greantel. Kenderc'het eo bet 18 000 t e 1960 ha 550 000 t e 1972 ! Diazezet eo an ijinerezh-se e Sant-Malo ha reiñ a ra labour da 450 den, en o zouez 70 martolod war 7 lestrig a ra gant kalvezelezhioù arnevez-tre.

Er skaotil e kaver war-dro 80-85 % karbonat kalkiom ha 10-15 % karbonat magnezium. Gantañ e reer un temz-douar kimiek gwerzhet dindan an anv "GAFSALGUE 16", ennañ 15 % trenkenn fosforek, etre 3 hag 8 % magnezium ha 50 % raz.

### ROUSSEAU-AVIATION

Anavezet mat eo hiziv ar gompagnunezh "Rousseau-Aviation" diazezet e Dinarz. A-drugarez dezhi ez eo deuet aerborzh Plouaerdud da vezañ ur gwir aerborzh etrevroadel er bloavezhioù diwezhañ. Re vuan he doa kresket an afer marteze ha diaesterioù moneizel he deus bet. E 1968 e werzhas an Ao. Claude ROUSSEAU 72% eus kevala ar c'hevredad d'ar gompagnunezh Fraissinet ur c'hevredad-paramantiñ gall met chom a reas e penn ar c'hevredad ... betek miz here 1972 pa voe pedet da reiñ e zilez hag anvet e voe en e lec'h an Ao. Fernand CHANRION, bez-rener ar c'hevredad Fraissinet.

Setu m'emañ an den-se o paouez reiñ e zilez d'e dro rak adprenet eo bet ar c'hevrannoù perc'hennet gant Fraissinet, an hanter gant un aergompagnunezh c'hall "Touraine Air Transport" hag an hanter all gant ar c'hevredad "SOREF Rousseau-Aviation", kontrollet gant an Ao. ROUSSEAU. Deuet eo en-dro hemañ e penn ar gompagnunezh.

### PESEURT GALLOUD A VO GANT AR RANNBARZHIOU GALL ?

D'an 27 a viz ebrel 1969 e respontas NANN darn vuiañ ar C'hallaoued d'ar poblaters (referendom) aozet gant De GAULLE diwar-benn ar rannbarzhioù ha kempennidigezh ar framm melestradurel gall. D'ar 5 a viz gouere 1972 e voe mouezhiet gant ar parlamant gall ul lezenn o plediñ gant ar gudenn-se met disteroc'h e oa c'hoazh ar c'hempennoù divizet enni.

Anvet e vo ur prefed e penn ar rannbarzhioù nevez ha aozet e vo parlamantoù rannvroel, enno ar gannaded dilennet evit parlamant riezal Paris (!??), dileuridi ar c'huzulioù-departamant ha dileuridi ar c'huzulioù-kêr bennañ. Dister e chomo arc'hantroll ar rannbarzhioù-se (25 F dre annezad d'ar vuiañ hervez al lezenn !) ha ne vo enno galloud-erounit ebet, nemet evel-just an Ao. Prefed !

Hervez al lezenn-se ivez e c'hello bezañ kemmet bevennoù ar rannbarzhioù arak an diskar-amzer 1973. En arvar emañ Breizh



da vezañ troc'het e daou ur wech ouzhpenn, Bro-Naoned o vezañ klenket c'hoazh en ur rannbarzh all, pe da vezañ beuzet en ur rannbarzh bras "Ouest" (kornog) enni departamantoù gall "Mayenne", "Maine-et-Loire" ha "Vendée" da skouer. El ledemsavioù e kaver furlukined evit stlakañ o daouarn dirak seurt astennidigezh hag int da zegas da soñj ez ae Breizh betek Angers da vare ar roue Salaun. Dizegemeradus eo e gwirionez bevennoù ur rannbarzh ha na vefent ket bevennoù ar Stad Vrezhon diwezhañ, da lavarout eo bevennoù ar pemp departamant pe dost, da lavarout eo ur gorread 34 000 km<sup>2</sup> (brasoc'h eget Belgia hag an Izelvroioù) hag ur boblañs 3 400 000 den (brasoc'h eget Luksembourg pe ar Republik Iwerzhonat a-vremañ) : bras a-walc'h eo Breizh.

Hag hon eus ni emsaverion den em chalañ gant seurt kudennoù ? Tentet eo kalz ac'hanomp da respont nann gante dismegañs hepken evit ar politikerezh gall. Ur fazi e vefe marteze. Ur c'hoapadurezh eo bet ar c'hempenn rannvroel betekhen met kemmañ e c'hellfe an traoù. En dilennadegoù hollet gall e voe goulennet gant strolladoù ar c'hreiz ("Réformateurs") hag an tu kleiz (PS, PSU) e vije roet d'ar rannbarzhioù ur galloud gwirion gant ur parlamant dilennet a-ratozh-kaer gant annezidi ar rannbarzh, gant ur galloud-erounit anvet gant ar parlamant-se ha dezhañ un arc'hantroll fetisoc'h. Mont a ra mat en-dro ur seurt reizhiad en Alamagn ar C'hornog hag en Italia. Er vro-se ez eo deuet a-benn ar strollad komunour da gemer ar galloud e rannbarzhioù zo, pezh n'en dije morse gellet ober er riez a-bezh.

E rannbarzhioù "Bourgogne" pe "Normandie" ne zegasfe ket kemmoù bras ur seurt reizhiad lakaet da vont en-dro er riez gall. E Breizh avat e c'hellfe bezañ ur benveg dispar evit emskiantekaat ar bobl vrezhon hag ober ur gammed ramzel war-du ar Frankiz.

#### SONDADUR ISKIS EN IWERZHON

Hervez ur sondadur-kedveno kaset da benn e miz meurzh 1973 ha brudet goude en holl gelaouennoù, ne vefe nemet 37 % eus annezidi ar Republik Iwerzhonat evit c'hoantaat c'hoazh adunvanidigezh an Enezenn. Ha sirius eo an enklask-se ? Ret e vefe gouzout ent resis penaos e voe kinniget ar goulenn ouzh an dud. Aon o deus kalz annezidi er Su a dra sur e teufe an tousmac'h o ren e Norziwerzhon d'en em ledañ er Republik da heul un adunvanidigezh sevenet dre an nerzh.

#### AR MORLU SAOZ EN ALBA

Kounnaret eo ar Skosiz adarre gant dezo ar morlu saoz da ziazezañ un tachad-arnod evit tarzherezed-bann ar splujerezed e-kichen enez Sgithlean (Skye) e gwalarn ar vro. Peskedus-tre eo ar c'horn-se ha stank ar bigi-pesketañ bihan ennañ. Diazezet mat eo ar Strollad Broadel Skosat er pastell-vro-se ha staget en deus da enebañ taer ouzh an dezo droch-se. Evel Breizh evit ar morlu gall ez eo Alba preizh ar morlu saoz. En inizi Orc'h emañ unan eus ar bonoù-brezel brasañ hag en Holy Loch bon ar splujerezed derc'hanel norzamerikat (N.A.T.O.).

D'an 27 a viz c'hwevrer e voe aloubet e-pad tri c'hard eur ur sal er "Welsh Office" (Burevioù ar sekretourva-Stad evit Kembre) e Kêrdiz gant emsaverion eus Cymdeithas yr Iaith, e-pad maz ae re all d'en em sparlañ en ur sal eus ar "Welsh Office" e TRhos-on-sea.

#### MAC'HEVEZH EN EUSKADI

D'an 12 a viz ebrel 1972, "Aberrri Eguna", devezh broadel Euskadi, e voe arsailhet ha tangwallet ur c'hlub spagnat e Sant-Sebastian. D'an 17 a vezheven 1972 e voe harzet gant ar bolis spagnat ur paotr ugent vloaz, Venancio ECHEVERRIA, ezel eus E.T.A.. Nac'h a reas daoust ma voe gwall voureviet gant ar Spagniz ha d'an 28 a viz c'hwevrer 1973 e voe kondaonet da 15 vloaz toullbac'h gant ul lezvarn e Madrid, daoust ma teuas tri zest da desteniekaat e oant gant Venancio en Isasondo d'an eur ma voe tangwallet ar c'hlub.

#### AN DILENNADEGOU EN IWERZHON

Aozet e voe dilennadegoù er Republik Iwerzhonat d'an 28 a viz c'hwevrer ha 334 danvez-kannaded en em ginnige d'an 1 783 000 mouezhier evit 143 sez ar parlamant. Gant FIANNA FAIL, strollad ar gouarnamant kent ha strollad an Ao. Jack LYNCH, ned eas ket avat an trec'h. Chom a reas strollad kreñvañ ar riez gant 69 kannad met gant Strollad al Labour (19 sez) ha FINE GAEL (54) unanet ez eas ar muiañniver ret evit stummañ ar gouarnamant. Penn ar strollad FINE GAEL, an Ao. Liam COSGRAVE, ur breutaer 51 bloaz anezhañ, a zo deuet da vezañ "Taoiseach" (tevezeg) nevez ar vro.

Setu kenaozadur ar gouarnamant nevez :

Tevezeg	Liam COSGRAVE (Fine Gael)
Bez-tevezeg	Brendan CORISH (Labour) hag a zo war-un-dro
Maodiern ar C'hedskor hag ar Yec'hed	
Maodiern an Aferioù-Diavaez	Garret FITZGERALD (Fine Gael)
Maodiern ar C'hellidoù	Richie RYAN (Fine Gael)
Maodiern ar Post	Conor Cruise O'BRIEN (Labour)
Maodiern al Labour	Michael O'LEARY (Labour)
Maodiern ar Gounezerezh hag ar Pesketaerezh	Mark CLINTON (Fine Gael)
Maodiern ar Greanterezh hag ar C'henwerzh	Justin KEATING (Labour)
Maodiern an Deskadurezh	Richard BURKE (Fine Gael)
Maodiern ar Barnerezh	Patrice COONEY (Fine Gael)
Maodiern ar Strollderioù lec'hel	James TULLY (Labour)
Maodiern an Difenn	Patrick DONEGAN (Fine Gael)
Maodiern an Dezougerezh hag ar Gremm	Peter BARRY (Fine Gael)
Maodiern an Dour hag ar C'hoadeier	Thomas FitzPATRICK (Fine Gael)
Maodiern ar Gouzelegva	Thomas O'DONNELL (Fine Gael)

=====

ME M'EUS C'HOANT UN TOULL ( Yod-Kerc'h ).

Brezhoneg ar bobl. Diskan anavezet mat. Klevet digant gallegerien dreist-holl.

Ur c'hoant mirout n'eo ken ; daoust d'ar strolladoù-se bezañ " ARAOGELOUR" pe "z-dispac'hel" (hervezo).

Ar re-se, desket mat war ar galleg, a blij dezho ober gant r brezhoneg, ur wech ar mare ; ket dilezel o sevenadur gallek evit .i hini brezhonek.

Ober gant div yezh, unan evit al labour hag ar studi, unan all evit an diduamant. C'hoariell tud aon ganto rak an amzer da zont.

Diaes dilezel ar Brezhoneg. Diaesoc'h stourm evit ma vo trec'h. Setu perak e chom kement a Vrezhonegerien o stourm eus an diavez oc'h implijout ur yezh isdiorreet, e-lec'h klask he buhezekaat. N'eo ket diaesoc'h ar stourm-se eget hini an tu kleiz gall evit ar Vietnamiz, pell eus an emgann. Gwelet mat eo gant ar boblañs, met ne servij ket da gal. tra. N'eo ket gant Brezhoneg ar maeziou pe gant prezegennoù brav e galleg e vo save-teet hor yezh.

Un dispac'h a zo d'ober. Dimp da gregiñ gant an dispac'h-se, ha n'eo ket gortoz digant ar muiañ niver. Ne vo ket sammet skoilhoù hor stourm gant tud all.

Dreist-holl arabat krediñ e vo gwelet mat hon oberoù evel re al bedemsav. Un harz eo bet ar Brezhoneg evit ar bobl izel. Distag e oa eus ar gevredigezh arnevez.

Gant ar galleg eo bet ar maout dre ma oa diorreet. Ken mat e vefe c'hoarvezet gant ur Brezhoneg lennegel. N'eo ket bet tennet kement-se ar Brezhoneg diouzh Pobl Vreizh; ganti eo bet dilezet dre ma ne servije ket ken d'en em uhelaat, nag evit ar vicher nag evit ar spered.

Ne chomfe ar Brezhoneg war ar maez nemet ma kemmfe ken buan hag ar galleg. Evit bezañ trec'h e vo ret d'hor yezh pellaat kalz diouzh he stumm kozh, miret war ar maez.

Diwar an diouer a gevredigezh oc'h ober gant ar Brezhoneg arnevez eo diwanet an disfiz outañ. Ezhomm bras a zo eus ar gevredigezh-se, drest-holl pa zigresk ken buan an hini all war ar maez.

Miliadoù a Vrezhoned o deus strivet evit deskiñ, lenn ha skrivañ

o yezh abaoe ur c'hantved. Nebeut a dra a zo diwanet diwar al labour-se. 'eo ar yezh nemet ur benveg a zarempred. Hep ur gevredigezh arnevez ne oa ket a implij eus ar ouizegezh-se. Neuze ne yae ket gwall bell ar seurt strivoù.

Gant an EMSAV eo bet kaset war-raok ar stourm evit hor yezh, al ledemsav o tont da heul. Kement-se dre ma oa eus an Emsav un danvez-kevredigezh unvan a-walc'h.

Gant krouidigezh ur gevredigezh arnevez e kêrioù Breizh e vo miret perzhioù mat hor sevenadur kozh, ha n'eo ket en ur virout e zismantroù war ar maez.

Tagañ a zo an doare nemetañ d'en em zifenn.

Ur getto e vo an Emsav pell amzer c'hoazh avat.

Gettoioù gwirion a vo da staliañ, war ar marc'had. E karterioù 'zo eus kêrioù Breizh. Deuet eo Sinaiz a-benn d'hen ober en Amerika (Los Angeles ha New-York). Ken mat e c'hellomp henn ober e Breizh pa'z eo brezhoneger c'hoazh kalz tud. Ha ne vo ket evit padout. Al lec'hioù galleger eo a zlec'hoazh bezañ gettoioù tamm ha tamm dirak kresk hor yezh.

Diaes e vo, ne vo ket didalvez avat.

Ne vo ket un toull-bac'h ar gettoioù brezhoneg evit ar spered, daoust dezho bezañ evit an niver a dud.

Aes eo kompren n'eo ket an niver a dud a ra ur getto, hogen an diouer a sarempred gant an diavez.

E kêrioù bras an amzer-vremañ ez eus ken nebeut a liammoù etre an dud, ma ra diouer ar sevenadurezh, nemet an hini degaset eus an diavez gant ar skinwel, kelaouennoù, h. c....

Klevet 'm eus un den en doa bevet hir amzer en Afrika. E unanik en em sante en e ranndi Hek gwech muioc'h eget war ar maez en Afrika. Ha n'eo ket an dud a vanke en e gichen, tro-war-dro da Paris.

Diorreetoc'h ha buhezecoc'h e vo marteze ur getto brezhonek eget ar gevredigezh c'hall da zont. Darempredoù founnus a c'hell bezañ etre pep hini ha gant pep pobl ar bed.

Ur getto speredel eo kalz muioc'h evidomp ar stad c'hall hag he deskadurezh, dre ma'z omp troc'het ganti diouzh amzer dremenet hor pobl, diouzh hor yezh, ... diouzhimp.

Peurliesañ e vez serret re ar pobloù warno, hep anavezout ar re all. Ar C'hallaoued da skouer. Ar c'hontrol a c'hoarvez dimp. Bro-C'hall a anavezomp mat, Bro-Saoz ivez... Hor bro avat ! Petra a anavezomp diwar he fenn goude bezañ bet er skolioù hir amzer ? ( nemet S.A.E. e vefe evel-just).

En em zigeriñ en ur grouiñ getto. Souezhusat tra ! Soñjal a ra din eo gwelloc'h anavezout don un dra eget deskiñ bruzunachoù war pep tra. Tud wirion eo, en abeg da se, an dud war ar maez, skiantourien pe stourmerien... ha n'eo ket pennoù bras ar " jeu des mille francs".

Ur gounid bras e vo, evit spered hor pobl, deskiñ ha prederiañ don war hon istor, hor sevenadur, hor yezh... zoken ma'z eo ret dilezel un tamm kudennoù all. Ha n'eo ket sur e vefe dilezet kudennoù all pa weler ez eus kement a dud ne lennont netra, n'int dedennet gant netra.

Ha ne reer ket don un dra, n'anavezer nemet neuz ar bed, evel ma ra tud 'zo oc'h ober tro ar bed, a Hilton da Hilton. Lec'hioù e-leizh a anavezont, pobl ebet ne gomprenont.

Ne vo ket ar gettoioù lec'hel gettoioù speredel ( gettoioù speredek ne lavaran ket).

Pelec'h 'vo savet hon " Harlem" kentañ ?

+++++  
-----

Reizhadennoù Un nebeut mankoù a zo en em silet e pennad kentañ an niverenn-mañ. P.110, c'hwec'hvet linenn adal al laez ez eo ret lakaat "brezel" dirak Algeria ; linenn 12, ouzhpennañ "kleizour" etre "ar gostezenn" ha "glasel" ; p.16, ouzhpennañ "evel m'emaint" etre "an traoù" hag "o laka".

P.142, linenn 2 : /N/'eo eo a ranker lenn. Linenn 3 : "Ned ae ket" a zo ar stumm reizh e-lec'h "Ne yae ket" hon eus lezet dre zievezh.

Pediñ a reomp al lennerion d'hon digareziñ evit ar mankoù-se.

-----  
Liesskrivet gant ar gelaouenn CPPP : 50 015 Ar merour : Y. Ollivier